

# EURUSTED AN AVIEL



FANCH AR MOAL hag ANNE AR BOURDONNEC

SKOL niv 45 MOUEZ St ERWAN niv 7



## EURUSTED AN AVIEL

D'ar sul 28 a viz kerzu 1969, e oamp on em gavet un de oennak e Crec'h-Avel, e vit ur reured vraz evit prederiñ a-gevret war "Gwenvidigezhioù an Aviel"; dindan renarezh Yann Faubat, eil-renar B.S.E. Da 16 e.30 e voe fidet un ofereñn vrezhenek dirak ar c'hapellad tud deuet a-bell hag a-dost.

Kavet em eus mat dastum dindan an titl "Eurusted an Aviel" pevar skrid disheñvel dre ar stumm, an danvez zoken daoust ma 'z iat liammat an eil gant egile dre an hevelep menoz: an eurusted a darsh ens ar garantez.

Da gentañ e teu, evel-just, testenn displegadenn Y.Faubat, advelet gantañ, ha da c'houde evezhiadennoù an Ao.Bourdellez a ginnig damdost an hevelep menozioù en ur yezh aesoc'h ha fetisoc'h.

Eünoc'h c'hoazh an brezegenn am boa graet e St Servez, d'ar 16 a viz eost 1969, evit eured Fañch ar Moal, teñzorer ar Vreurezh, hag Anne Le Bourdonnec. Eus Bro-Gembre e teu dimp skouer ur vuhez gouestlet penn-da-benn da zifenn gwirioù tud e vro, hini an Dr D.J.Williams, nebeut anavezet e Breizh, siwazh ! Ar gembraegerien a garfe anavezout gwelloc'h buhez hag oberoù ar stourmer-se a c'hell lenn "D.J.Williams, Cyfrol Deyrnged", Gwasg Gomer, 1965, priz: 12/6. (1)

Ar pajennoù gallek a zo bet laket e-kreiz en doare ma c'hell neb a garo o distagañ hag o surel kuit hep dispenn an dastumadenn. Tu a zo ivez bre-nañ skouerennoù distag anezho evit 0,50 lur ar pesh.

Armañs Ar C'halvez.

1) A levr-se a zo en em gavet ganin p'em boa aozet hag adskrivet ar pennad. Ur fazi a zo da reizhañ : ar polis en doa kavet testoù evit proufiñ e ouie S.Lewis ha L.Valentine saozneg, met hini ebet evit D.J.Williams, kelenner war ar yezh-se ! op.cit.p. 49

### DISKLERIADUR B.S.E.

Degas a reomp da soñj, ur wech ouzhpenn, d'an Aotrounez Eskibien, pe-naos emañ stad Breizh er mare-mañ: an diboblañ o kenderc'hel, an diouer a labour evit ar re yaouank, enkadennoù: al labourerien-douar hag ar vicherourien, an dud kozh dilézet, ar sevenadurezh hag ar yezh o kouezhañ, gwasket ma vezont gant ar gouarnamant gall.

Goulenn a reomp ouzh hon eskibien sklerijennañ en un doare fraezh hor c'henvroiz, en doare ma vo tu da ziazezañ un urzh reishoc'h evit ar Bobl, evel ma lavar kelennadurezh ar Bibien diwar-benn ar broioù-suj.

Nous ne pouvons nous empêcher d'attirer une nouvelle fois l'attention de Nosseigneurs les Evêques de Bretagne, sur l'état actuel de notre pays: l'exode continu, le manque de travail pour les jeunes, la situation angoissante du monde paysan et ouvrier, l'abandon des personnes âgées, l'état critique de la culture et de la langue que le gouvernement français cherche à faire disparaître.

Nous demandons à nos Evêques d'éclairer nos compatriotes, afin qu'il soit possible d'obtenir plus de justice pour notre peuple, ainsi que l'ont maintes fois rappelés les enseignements pontificaux récents sur les droits des minorités nationales.

N.B.Diskleriadur kentañ, Skol niv.40,p.14

- 2 -

## AR GWENVIDIGEZHIOU

"O welout an engroezioù-tud e savas Jezuz war ur menez, hag aet en e goarez, e tostaas ouzh e ziskibion. Neuze e stagas da gomz ha d'o c'helleñ o lavarout :

Eürus ar re a zo distag o c'halon diouzh madoù an douar, rak dezho eo rouantelezh an Neñvoù.

Eürus ar re a ouel, rak int a vo frealzet.

Eürus ar re a zo dous, rak int o devo an douar da lod.

Eürus ar re o deus naon ha sec'hed eus ar Reizhded, rak int a vo roet o gwalc'h dezho.

Eürus ar re a zo trugarezus, rak int ivez a vo trugarez evito.

Eürus ar re a zo glan a galon, rak int a welo Doue.

Eürus ar re a laka ar peoc'h da ren, rak int a vo anvet gwir vugale Doue.

Eürus ar re a zo gwallgaset en abeg d'ar Reizhded, rak dezho eo Rouantelezh an Neñvoù.

Bezit eürus pa viot dismegañset, heskinet, pa vezo droukkomzet e gaou diwar ho penn, abalamour din-me.

Bezit laouen; ra drido o kalon gant levez, rak bras e vo ho tigoñ en Neñvoù. Rak evel-se ivez eo bet gwallgaset ar Brofeded a zo bet en ho raok!

Mt,5,1-12

### O ZALVOUDEGEZH EVIT AN DUD A-VREMAN.

#### DIGORADUR

Div destenn hon eus eus an eizh Eurusted en Aviel: e Sant Vazhev (Mt,5, 1-12) hag e Sant Lukaz (Lc,6,20-26). Tu a zo d'o studiañ, pe d'o burutel-lat e giz al lennegezh, pe da glask o ster a relijion hag a spered. An eil doare eo a gemeromp amañ. Re Sant Lukaz a zo berroc'h, reutoc'h, disheñvel diouzh re Sant Vazhev. Pouezañ a ra muioc'h war o ster a gevredigezh, war an digoll o devo ar re baour e Rouantelezh Doue, war ar "bremañ" ha war an "amañ", war ar mallozhioù d'ar re binvidik. Lavarout a rafen eo testenn St

- 3 -



Lukaz muioc'h "dispac'hel" eget hini Sant Vazhev.

Ar pezh an eus c'hoant da ober er gaozeadenn-mañ eo studiañ hervez testenn Sant Vazhev talvoudegezh an eish Eürusted evit hor buhez a-vremañ, ni kristenien ar bloaz 1969. Ar gudenn a zo gouzout pe levezon e tle ksout komzoù an Aviel war dachenoù liesseurt hor buhez a hinienoù hag hor buhez er gevredigezh, evit tud an holl vroioù. Er mare-mañ e lavarer alies ez eus un troc'h diremed etre ezhommoù, redioù ar bed teknikel a-vremañ, ha kelennadurezh speredel an Aviel. Lavarout a reer alies eo echu marevezh ar Feiz Kristen, hag an denelezh deuet d'hec'h oad gour n'he deus netra ken da welout gant un Doue a gouezhe warni evel ur Mestr a-ziavaez ha dic'hortoz, ijinat gant ar c'hant vedoù a-wechall. En enep da se, an eish Eürusted a ziskouez dimp an ere, ar c'hendeuzadur zoken, etre ar pep donañ e kalon Mab-den ha diskleriadur an Aotrou Doue, dre Hor Salver, evit pep hini ac'hanomp, bremañ hag amañ e-lec'h ma vevomp, en doare ma ro d'hor buhez un diazez hag ur pal nevez.

Studiañ a raimp eta da gentañ petra eo ar wir Feiz Kristen, ha petra n'eo ket, petra a lavar dimp dre vras an eish Eürusted, hag en diwezh talvoudegezh pep hini anezho.

A - PETRA EO HA PETRA N'EO KET AR FEIZ KRISTEN ?

1° AR FEIZ KRISTEN N'EO KET UR GELENNADUREZH POLITIKEL

Kement-se a oa sklaer gwechall evit an holl gristenien. Marteze n'eo ket ken sklaer bremañ dre ma vez politikaet pep tra abaoe astennidigezh ar varkselezh. Gwelout a reer kristenien o klask tennañ war-eeun ur politikerezh eus an Aviel (kv. J.M.Paupert, *Pour une Politique Évangélique*). Darn all a lavar n'eo rouantelezh Doue nemet ar gevridigezh reizh a glaskont diazezañ er bed douarel-mañ (kv. H.Cox, *The Secular City*). Sellomp avat ouzh skouer ar C'hrist e-unan. Jezuz en deus prezeget ar Rouantelezh-da-zont, donedigezh an amzerioù nevez; diskleriet en deus eo deuet amzer ar Feiz, rak eñ eo ar Mesiaz gortozet a bell 'zo hag e rank pep hini kemm e galon evit bezañ un den nevez. Ar Juzevien avat a c'hortoze ur Mesiaz politikel a argasfe ar Romaned. Hogen, bewech ma klaske an engroezioù ober ur Roue douarel gentañ e tec'he a-dre o daouarn hag ez a da bediñ. Jezuz a zo ar C'hrist Roue, met e rouantelezh n'emañ ket er bed-mañ evel ar rouantelezhioù amserel. A-benn an diwezh o deus darn eus ar Juzevien lakaet ar C'hrist d'ar marv dre na sente ket outo ha ma tis-klerie dezho o fec'hedoù. An digarez a oa unan politikel hag unan faos war ar marc'had. An uhelidi a damallas da Jezuz stourm enep an alouberien ha la-

kaat dizurzh er vro, ar pezh a oa risklus evito. Pa voe goulennet ouzh Jezuz ober diskleriadurioù politikel, en deus respontet war ul live all, o lavarout d'e c'houlennataerien dibab o-unan o emzalc'h politikel, ha sealou diouzh an tu all ouzh komzoù Doue. Jezuz ne fall ket dezhañ divizout e plas an dud war aferioù an den, rak krouet eo bet an den evit ren war ar grouadelezh.

2° AR FEIZ KRISTEN N'EO KET DA GENTAÑ UR GELENNADUREZH A VUHEZEGEZH PE A GEVREDIGEZH

Kelennadurezhioù a vuhezegezh pe a gevredigezh a zo bet savet en holl vroioù abaoe kantvedoù kentañ ar sevenadurezh, er-maez eus Diskuliadur Doue. An den a gav en e goustiañs hag el lezenn naturel peadra da sevel ur gelennadurezh dereat a-walc'h evit ar vuhez voutin, rak pep tra a zo bet krouet gant Doue hag e pep tra e Jenner ar merk eus gwirionez ha santelezh Doue. Hogen, hep gras an Diskuliadur ha nerzh ar Spered Santel e chom diaes hag arvarus ren ur vuhez reizh abalamour da c'hloaz ar pec'hed. Kement-se ne vir ket ouzh ar morolioù sinaat hag indezet diazezet war kelennadurezh ar vouddhaadegzh hag hini Konfusius, pe ouzh ar Stoikelezh er sevenadurezh c'hresian, hag int pagan, bezañ talvoudegezhioù bras eus ar speredelezh. Ar C'hrist n'eo ket deuet da ziskleriañ dimp hevelep furnez denel. Ur furnez denel a c'hellomp kavout hon-unan gant hor poell. Ar C'hrist a zo deuet da gas dimp ar Silvidigezh, da lavarout eo, reiñ tu d'ar re a grede ennañ da gemer perzh dre ar Feiz e savidigezh Rouantelezh Doue, en doare da vezañ gwir vugale d'an hini en deus roet ar bezoud d'an holl draoù dre E Garantez dreistmuzul. Hent ar Rouantelezh peurbadel a zo sklerijennet gant misterioù santel Enkorfadur, Kroazstagadur ha Dasorc'hidigezh Mab Doue, ar Verb unganet ha peurbad. Aze emañ an alc'houez a bep tra. Hag ar skouer-se a zo dreistnatur, dic'hallus d'hor meiz hen dizoleiñ hon-unan. Setu perak eo deuet ar C'hrist e-unan d'hen diskuliañ dimp, o vezañ ganet evel un den ha diazezet en hon istor douarel. Keloù-Mat ar Silvidigezh, pa zeu betek hor c'halon a ra ac'hanomp ur boud nevez, rak e-keñver ar Rouantelezh e tle hon emzalc'h kemm penn-da-benn, peogwir ez omp galvat da vezañ santel evel m'eo Santel-meurbet hon Tad a zo en Neñvoù.

3° N'EO KET UR PREDEROURIEZH

Prederouriezhioù don ha talvoudus ez eus bet, a zo c'hozh, a-zi-

maez da ziskuliadur an Daou Destamant. Gwirionezhioù war an Den, war ar Boud, war ar Bed danvezel, war ar Gouzoud, a oa bet kavet gant ar C'hresianed, gant Indeziz ha Sinaiz; ar Yuzevien ne oant ket en deroù ken spe-redek hag ar pobloù murse war gudennoù ar filozofiezh. Tamm-ha-tamm avat o deus savet ur sevenadurezh uhel o kemer er prederouriezhioù pagan ar pezh a glote gant an Torah (Al Lezem) hag ar Brofeded (kv. *Levr ar Furnez*, skrivet war e-eeun e gresianeg.). Ar Gristenien o deus graet kemend-all p'o deus displeget gwirionezhioù ar Feiz e sistemad Plato ha Plotin evel ma reas Sant Augustin, pe e sistemad Aristoteles evel ma reas Sant Tomaz Aquina. En hon amzer-ni e c'heller klask displegañ gwirionezhioù ar Feiz e prederouriezh Bergson pe Heidegger. Met ar C'hrist n'eo ket deuet da ziskleriañ dimp petra eo ar bezoud hag an hnovoud, petra eo ar gouzoud hag an ober. Kement-se a zo labour hor poellegezh. Deuet eo da ziskleriañ dimp ar Silvidigezh hag an hent a gas da Rouantelezh Doue. Kement-se a zo dreist d'hor poellegezh, daoust na c'hell morse bezañ a-enep peogwir pep tra er grouadelezh a zo merk a vezañs hag ober Doue. Ar Gristenien eta a c'hell heuliañ prederouriezhioù disheñvel gant ma chomint digor da wirionezhioù ar Feiz, a zo war ul live all. Ar prederouriezhioù a nac'h Doue hag an Dreistnatur a zo faos, hag ez eont ermaez eus o zachenn. Ar pezh a nac'hont, ne c'hell ket bezañ an Doue bev ha gwirion, hollgarantezus, diskuliet en Istor Mab-den.

#### EVIT KLOZAN

Ar Feiz kristen n'eo ket un ideologiezh, n'eo ket ur relijion. Heñvel ouzh ar varkselezh war ar poent-se, ez eo da gentañ un ober: da lavarout eo un emzalc'h, ur respont pemdezic da c'halv hor Salver Jezuz-Krist. Ar Feiz kristen n'eo ket ur sistemad klok a ro deomp diouzhtu, hep hanterouriezh, alc'houez an holl zarvoudoù, hag un urzh resis evit pep obererezh. Ur sklerijenn eo war dazont diwezhañ an Denelezh hag ur sellad nevez war vuhez Mab-den. Ar Feiz kristen n'eo ket ur relijion. Jezuz-Krist, mab Doue, a zo diazezet mat en Istor hag en Douaroniezh. Anavezout a reomp pegoulz, pelec'h ha pensos en deus bev et hag eo bet lakaet d'ar marv. Ar Feiz kristen a dalvez evidomp-ni bremañ, amañ, e-lec'h m'emaomp, rak ar Verb deuet korf war hon douar, a zo bev hag oberiant, hag e ren a-unan gant an Tad hollc'halloudek, en unaniezh ar Spered Glan, a holl viskoazh da holl viken. N'eo ket ur mitologiezh. Ne Glaskomp ket implijout nerzhioù an

an doueelezh evit o lakaat da blegañ d'hor c'hoantoù hag eshomoù douarel. Ar c'hontrol an hini eo. Klask a reomp en em lakaat e servij an Aotrou Doue evit bezañ gwelloc'h e servij hor breudeur.

Ar Feiz kristen eta a zo Jezuz-Krist dasorc'het, hag en deus diskuliet dimp an Tad, ar Mab, hag ar Spered Glan, a zo Doue unan e tri Person. Jezuz-Krist, bev, oberiant, ha leun a c'hloar, a gemm va buhez hag a ro he ster dezhi, ma hag a zo bet badezet en dour evel ma vos Eñ badezet er gwad war ar Groaz evit silvidigezh an holl.

Ar Feiz kristen a zo Enkorfadur, Kroaz, ha Dasorc'hidigezh. Misterioù Jezuz-Krist a zo gwirionezhioù hor buhez denel. Anavezout ha karout gwelloc'h hor Salver a zo anavezout ha servijiñ gwelloc'h an dud hag ar pobloù. Netra e buhez Mab-den n'eo diseblant da Zoue, netra diseblant e-keñver Rouantelezh an Neñvoù peogwir ar Verb en deus kemeret hon naturden. Ar Feiz kristen a zo denel penn-da-benn dre ar Grouadelezh, ha dre Enkorfadur ho Salver. Ar Feiz kristen a zo doue penn-da-benn dre an Dasorc'hidigezh ha skuilherezh ar Spered Glan, dre ar Rouantelezh prometet dimp. Reiñ a ra pep tra d'an den ha pep tra da Zoue. Ur follentez eo evit ar preder difeiz; ar Furnez vrasañ evit ar Gristenien a gred, dre c'hras ar Feiz, en enkorfadur Jezuz-Krist, gwir den ha gwir Doue. Abalamour da se évez he deus hor Feiz kristen un dra bennak da lavarout dimp diwar-benn hon ober politikel, buhezegezhel, kevredigezhel. Met arabat gortoz eus ar Feiz un diskoulm d'ar c'hudennoù hon eus da ziskoulmañ hon-unan. Kement-se a zo hervez Ravegezh Doue e-unan, en deus hor c'hrouet poellek ha dieub.

Talvezout a ra eta ar Feiz e Jezuz-Krist evit an holl amzerioù betek e zistro klodus, evit an holl bobloù ha sevenadurezhioù, evit an holl renkadoù-tud er gevredigezh. Ur skouer eus kement-se eo an Iliz Santel hec'h-unan, Korf kevrenn ar C'hrist, hag a zo katolik, ha lavarout eo hollvedel.

#### B - AN EIZH EURUSTED KRISTEN

##### 1° N'INT KET UR GELENNADUREZH POLITIKEL NA KEVREDIGEZH

Diresis e seblantont bezañ zoken, evit an hini a glaskfe enno mennañ da lakaat da dalvezout war-eeun er gevredigezh. Ne c'heller ket tenañ ur gelennadurezh politikel diwar an Eizh Eurusted, met ur sklerijenn int evit termeniñ pehini e tle bezañ hon emzalc'h e-keñver ar politi-

keresh.

## 2° MET UR GELENNADUREZH RELIJIEL HA SPREDEL

Da lavarout eo ur gentel a denn da zonedigezh ar Mesiaz, oc'h embann dimp eo krog adalek bremañ Rouantelezh an Neñvoù; e four an darvoud-se e rankomp, hic et nunc, kemma hor buhez en doare da vezañ gwir vugale an Aotrou Doue. A-benn bremañ eo krog ar Rouantelezh, ma kenta eo ket peursevenet. Emañ o kreskiñ. Fiziet eo bet ennomp-ni al labour-se. Seveñ ÷a kreskiñ ha n'eo ket distruj. An distruj eo ar pec'hed. Doue eo a ro silvidigezh, ha n'eo ket hon oberoù; met dre e Garantez dreistmizul en deus hor galvet da gemer perzh e savidigezh e Rouantelezh, abaoe Abraham hag an emglev gant pobl Israhel, rak galvet omp da vezañ e vugale, breudeur Jezuz-Krist. Bewech eta ma kasomp ar bed war-raok gant ar skiantoù, an deknikelezh, an arboellerezh, an arzoù ar sevenadurezh e savomp ul lodenn nevez eus Rouantelezh Doue (kv. Diskleriadur pastorel ar Sened-Meur Vatikan II: Gaudium et Spes § 33 & 34).

## 3° EFEDUSTED

An efedusted n'eo ket da vezañ klasket en Eizh Eürusted o-unan evel ma ra Sinaiz gant *Levrig Ruz Mao Tse Young*, met en NERZH a ro keleñnadurezh ar C'hrist evit kas war-raok hor buhez den, hor buhez kristen, en holl zegouezhioù. Ne c'heller ket tennañ war-eñ diouzh keleñnadurezh an Eizh Eürusted nag un ober politikel strizh, nag un ober kevredigezhel a vefe kristen drezo o-unan. Rak evit hol labour denel, ar C'hrist hol lez dieub da zibab ha da oberiañ. Aze emañ hor c'hiriegezh. Ne zleomp ket gortoz ma vo diskoulmet hor c'hudennoù gant Doue e-unan, peogwir ar gristenien n'int ket sklaved. Hon enor a dud a zo el labour a-hiniennoù hag a-strolladoù a reomp, sklerijennet, gwir eo, gant ar Spered a vuhez, met en hor c'harg-ni hon-unan. War ar politikerezh n'hon eus ket muioc'h a finess eget an dud dizoue; gellout a reomp faziañ kenkouls hag ar re all. Ar pezh a ouzomp eo n'eo ket diseblant ar pezh a reomp e-keñver Rouantelezh an Neñvoù, n'eo ket diseblant ar pezh a reomp evit ar bed a-vremañ e-keñver raktres an Aotrou Doue war an deñvez. Ar pezh a ouzomp ivez eo ne c'hellomp ket klask digarez evit kuzhat hor fazioù, hor pec'hedoù, holloaskentez. Ar pezh a ouzomp ivez eo hon eus da gantañ mont er-maez eus hon emgarantez, ha biskoazh h'hor bo graet a-walc'h, ha dalc'hmat hor bo da c'houlenn muioc'h a nerzh di-

gant Doue. Ar c'hristen a oar en deus ur garg, ur samm (lavarout a rafen ur c'halir, evel ma lavare Jezuz e Gethsemani) a rank dougen betek ar fin, ha ne zeu netra da vat hep sakrifis ar Groaz. Ar c'hristen a oar ne c'hell ket bevañ disourci dirak an naonegezh, an direizhded, ar brezel, ar gasoni, an dic'hoanag, ar pec'hed. Gouzout a ra perak, dre ma kred e Dasorc'hidigezh ar C'hrist. Gouzout a ra pegen pouezus eo al labour a zo bet fiziet ennañ gant ar C'hrist, ha pegen difrouezh e vo alies. Abalamour da se e vo goulennet muioc'h a feiz digantañ, muioc'h a esperañs c'hoazh, bemdez muioc'h a garantez, rak gant an Aotrou Doue ne gaver morse ar bazenn ziwezhañ. Eno emañ, a soñj din, dibarded, brasder ha diaester ar vuhez kristen. Anavezout an diazez, an alpha, hag ar pal, an Omega, met an doare da vont reizh war an hent denel, ne ouzomp ket, daoust m'en deus diskuliet hor Salver deomp pere e tle bezañ gwiziennoù speredel hon emzalc'h. Diwar ar gwiziennoù-se e tleomp sevel un ober, urzhiat hag efedus, dizehan daoust d'ar doilhoù ha d'ar c'hwitadennoù, karantezuz daoust da gasoni ar bed, leun a c'hoanag hag a levez daoust da zic'hoanag ha tristidigezh ur bern tud, leun a uvelled daoust da lorc'h teknikel ar bed a-vremañ. An diforc'h brasañ etre ober ar c'hristen hag ober un den dizoue a zo en hor disurentez: ar c'hristen ne c'hell ket paouez e labour; e "nunc dimittis" a vo d'e eur ziwezhañ; ne c'hell ket lavarout: "trawalc'h evidon, d'unan all da ober va labour fiziet ennon gant Doue"; ne chell ket kennebeut lakaat e holl engouestladenn er pezh a ra, rak n'eo ket ni a salv ar bed, an Aotrou Doue eo hen gra. Nerzh ar c'hristen a zo szez: dieub eo penn-da-benn e-keñver ar bed hag al lezenn gozh, rak n'hon eus nemet ur mestr, Doue, ha ne blegomp dirak mestr danvezel ebet, na dirak ar binvidigezh, nag ar Stad, nag an Dispac'h, nag an enorioù douarel, nag an araokaat teknikel. Evel-se eta e kerzhomp divrall betek ar penn diwezhañ hep kavout hor gwalc'h en traoù krouet. Ar vuhez kristen a zo war-un-dro un drama, alies kalet hag ankenius, hag ur meulgan dibaouez da Zoue, evit ar joa a laka en hor c'halon. Ar C'hrist n'en deus ket hor galvet evit bezañ sklaved, met evit bezañ tud wirion, e vignoned, hadet enno dre vestuz ar Spered Santel un hadenn a beurbadelezh, hag a zoueelezh.

K - PENAOS E VEV AN DEN AN EIZH EÜRUSTED : AR C'HALVIDIGEZH D'AR SANTELEZH

Studiomp bremañ an Eizh Eürusted an eil war-lerc'h eben.

## 1° DA GENTAN : EURUSTED AR RE BAOUR

Ret eo merzout da gentañ-holl ne veul ket St Vazhev ar baourentez dre zhi hec'h-unan. N'eo ket lezel an dud en o faourentez a zo d'ober, kement-se a zo enep krenn d'ar spered kristen. Met an emzalc'h a zleomp kaout eo ar baourentez a spered, ma vennomp labourat en un doare kristen er bed a-vremañ: distagañ hor c'halon diouzh madoù an douar.

a) Pehini eo talvoudegezh ar baourentez a spered er bed a-vremañ ?

Dibab a-ratozh ur vuhez a baourentez a zo diskouez n'eo ket an ar-c'hant, an enorioù, an danvez, an deskamant, pal gwirion ar vuhez. Kement-mañ a zo enep ar spered a ren en hor sevenadurezh. Met na vezomp ket souezhet. Kelennadurezh ar C'hrist he deus talvezet a-hed an ugent kanved eus ar marevezh nevez, betek hon amzer-ni. Ha dalc'hmat eo bet an enorioù, ar madoù hag all, un temptadur boemus-kenañ evit an dud. Kalon Mab-den ne cheñch ket. Hiziv an deiz evel gwashall hon eus ni kristenien labourat d'ober hep dere'hel kon, mar gellomp eus an traoù-se a ginnig kemer evidomp plas an Aotrou Doue. Falsdoueed, idolennoù n'int ken, met pegen lugernus a-wechoù. Ar binvidigezh a vez brein pa vez gwall-implijet. Sed amañ ar pezh a skriv St Jakez en e lizher : "Hama! Deoc'h-c'hwil bremañ, tud pinvidik ! Skuilhit daeroù, yudit en abeg d'ar gwalloù a ya da gouezhañ warnoc'h. Brein eo ho pinvidigezh; debret eo ho tilhad gant an tartouzed. Merglet eo hoc'h aour hag hoc'h arc'hant hag ar mergl anezho a destenio a-enep deoc'h hag a zebro ho kig evel un tan. Dastumet hoc'h eus teñzorioù en deizioù diwezhañ. Setu gopr-al labourerien a zo bet o vedit en ho parkeier, ar gopr-se hag hoc'h eus miret diouto, o krial a-enep deoc'h. Garmadennoù an eosterion-se a zo aet betek divskouarn Aotrou an Armeoù, Mestr ar bed. Bevet hoc'h eus war an douar e-kreiz ar blijadurezh hag ar pompad. Gwalc'het hoc'h eus ho kalonoù e deiz al lazhadeg. Kondanonet hoc'h eus, ha muntret an den reizh: ha n'en deus ket harzet ouzhoc'h". Jc,5,1-10

Ar baourentez a zo un emzalc'h pozivitel, n'eo ket un nac'hadenn. N'eo ket lavarout nann d'ar binvidigezh, met labourat hep soursial outi: paourentez n'eo ket mizer. Ne zleomp ket klask bevañ er reuzidigezh (nemet ur c'halvidigezh ispisial e vefe). Rak hon deverioù e-keñver hon nesañ hag hon bro a dremen da gentañ. Paourentez a zo uvelled hag euned. An hini a zo paour a spered eo an hini na red ket war-lerc'h ar pinvidigezhioù douarel evit lakaat e blijadur enno, met er c'hontrol an hi-

ni a labour ingal o soñjal en ezhommoù ar re all, hag a ra evel-se bolontez Doue. Ar baourentez eta a zo da gentañ un ober.

Evit saveteiñ an dud eus o fec'hedoù, evit sikour ar pobloù e isdiorret, evit reiñ esperañs d'ar pobloù gwasket, e ranker dibab ar baourentez a spered, hag ivez a-wechoù ar baourentez danvezel hec'h-unan, a'zeu da heul alies a-walc'h.

b) Stourm ouzh ar wall-baourentez.

Ar reuzidigezh, an naonegezh, an isdiorradur, a zleer stourm kreñv ou to. Ar garantez kristen eo. *Gaudium et Spes, Mater et Magistra, Populorum Progressio* hel lavar dimp fraezh. N'eus ket ezhom da bouezañ kals kennebeut war ar pezh hon eus da ober e Breizh evit reiñ buhez d'ar vro.

Ar broioù paour a zo bet lakaet da c'houzañv ar reuzidigezh, pe a zo bet dalc'het er reuzidigezh. Kement-se a zo kontrol d'al lezenn naturel, ha d'ar reizhded. Frouezh an direizhded eo, da lavarout frouezh ar pec'hed. Evit stourm ouzh an droug-se n'eus diskoulm ebet nemet an emgann peoc'hus evit diorren ar broioù paour diouzh hor gwellañ. An naonegezh a zo pec'hed. Pec'hed eo enep ar garantez, enep gwirioù Mab-den, enep krouidigezh an Aotrou Doue. Pec'hed eo enep an Aviel a lavar dimp ez omp holl breudeur.

Mat eo da bep hini dibab ar baourentez evitañ e-unan.

Fail eo rediañ ar pobloù pe an dud da vevañ er baourentez. Rak lezenn ar vuhez kristen, galvidigezh bugale Doue, a zo er frankiz hag er garantez.

## 2° EURUS AR RE A OUEL, RAK INT A VO FREALZET

Ret eo kompren ster gwirion ar frazenn-mañ evit hor sevenadurezh a-vremañ. Ar C'hrist ne lavar ket dimp e tleomp gouelañ evit bezañ kristenien vat. N'omp ket klouarennoù, met tud nerzhus dre nerzh ar spered a vuhez. Gouelañ, n'eus talvoudegezh speredel ebet drezañ e-unan. Met eürus eo ar re o deus abegoù mat da ouelañ, rak gant Doue e-unan e vezint frealzet, dic'hlac'haret. N'eus merk ebet a wander aze. Pep hini ac'hanomp a oar mat pegen glac'haret, goull, izel, dic'hoanaget, dilazet e c'hellomp en santout a-wechoù, dreist-holl pa n'ez a ket hol labour pe hor yec'hed pe hon tiegezh war-raok, pa ne gerzh ket mat an Em-sav, pa c'hwit hor strivoù, pa vez trec'h an direizhded war ar Reizhdad, pa vez brezel el lec'h ma tlefe bezañ kenlabour. Peadra a zo da vezañ



diskaret. Anzavomp hor gwander. H.S.Jezuz e-unan en deus santet pegen dilezet e oa ha goulennet en deus bezañ disammet diouzh e Basion. Met nerzh ar Spered Santel a oa ennañ. Ha nerzh en deus adkavet. "Hogen, ra vezo graet hervez Ho Polontez". Jezuz staget war ar Groaz a c'halv an Tad: Aotrou, Aotrou, perak hoc'h eus va dilizet ? Ha ni ivez a gemer an hevelep hent hag hini Hor Salver: Ya, Aotrou Doue, marteze n'hon eus ket fiziet a-walc'h ennoc'h, evel ho tiskibien er vag pa voe arnev trumm war al lemm hag o devoe aon da vervel. Daoust ha n'hon eus ket soñjet e c'hellfemp en em salviñ, ha salviñ ar re all, hon-unan ? Re nebeut a fiziañs e Doue, ha re a fiziañs ennomp-ni. Daoust ha n'hon eus ket bet c'hoant a-wechoù d'hoc'h argas eus hor buhez ? Eürus ar re a zo bet graet droug dezho, eürus ar re o deus stourmet enep an holl zi-reizhderioù a welent hag a zo bet brevet ganto evel ar C'hrist gant e groaz koad, rak e Doue e kaver an nerzh da gendrec'hel ha da vont bepred war-raok.

## 2° EURUS AR RE A ZO DOUS, RAK INT O DEVO AN DOUAR DA LOD

An douster ne seblant ket bezañ ur vertuz doujet-kaer er bed a-vre-mañ. Ar c'hudennoù a zo ken tenn ma kaver ret kemer doareoù feuls evit argas an direizhderioù politikel ha kevredigezhel. Petra a c'hell an douster bezañ er bed-mañ, pa ne weler mui nemet pobloù oc'h en em gan-nañ, ar gaou hag ar gwalloù o ren, ar re binvidik o waskañ war ar re baour ? Ar gristenien a zo daouhanteret. Darn a-du gant ar wallnerzh e- vit diazezañ un urzh reishoc'h. Darn all a-du gant an enep-nerzh evit an hevelep pal. Petra dibab ? Ar C'hrist a ziskouez dimp pelec'h emañ hor c'hiriegezh. Dimp-ni da zibab hervez hor c'houstiañs, goude bezañ studiet mat an abegoù, an hentennoù, ar palioù hag an efedoù. Ar C'hrist ne zibab ket evidomp. An Iliz kennebeut, daoust ma verk a-wechoù pelec'h emañ an hent reizh ha pelec'h n'eus diskoulm ebet. Met netra ne zeuio da vat ma ne gasomp ket hor stourm war-raok gant an douster, ar garantez en hor c'halon. Ma stourmomp dre gasoni e c'hwitomp. Pounner eo heuliadenn hon oberoù evit ar bed-mañ hag evit ar bed all. Rouantelezh an Neñvoù eo a c'hwitomp warnañ ma ne fell ket dimp derc'hel gant douster en hor c'halon. Heñvel dra evit ar peoc'h. Eürus ar re a laka ar peoc'h da ren, rak int a vo anvet bugale Doue. Evit diazezañ un urzh reishoc'h e Breizh e rankimp marteze implijout hentennoù nerzhus, feuls, marteze dispac'hus. Hor Salver a zegas dimp da

da soñj n'eo ket ar bed-mañ ur bed a aelez, ha ne sleomp ket klask digarezioù d'hon doareoù fall. Ar bed a zo leun a bec'hed, hag e vevomp ennañ. O klask ober ar vad, en desped dimp, e raimp traoù fall war-un-dro. N'eus ket da glask digarezioù en a-raok, evel ma c'hoantafemp bezañ ghan, en doare ma teufe Pasion ha Dasorc'hidigezh ar C'hrist da vezañ diezhomm evit ar Silvidigezh. Eürus ar re a zo sammet o c'halon rak dilivret e vezint eus o bec'h. Sakramant ar binijenn a zegas soñj dimp eus ar Silvidigezh hag eus Madelezh Doue. Ezhomm hon eus eta eus ar Silvidigezh dre Jezuz-Krist. Galvet ez omp da vezañ santel evel n'eo santel Doue hollec'halloudek; met peogwir ez eus pec'hed er bed-mañ, n'eo ket ni a c'hell en em santelaat hon-unan, Doue eo hor santela dre ar gwad hag an dour, lavarout a ra dimp e tleomp kerzhout war hent ar santelezh, hini ar garantez peurvat, met e Rouantelezh an Neñvoù eo e vo Iliz klodus ar Sent, war hon douar n'eo nemet un hadenn a santelezh o kreskiñ tamm-hatamm evit reiñ ur wezenn vras, pa zistroio Hor Salver Jezuz da varn ar re gev hag ar re varv.

Mar implijomp ar gwallnerzh, na glaskomp ket lavarout eo mat; fall eo, pec'hed eo. Met marteze ne oa ket un hent all. Kement-se a sell ouzh hor c'houstiañs. Ar pezh a zo sur, eo hon eus ur Barner reizh en Neñvoù, hag a ro dimp sklerijenn ha kalon. Ar pezh a zo sur ivez eo n'eus diskoulm ebet ma lezomp hor c'halonoù da vezañ breinet gant ar gasoni. Evit ar peurreat, dimp-ni da zibab; tud omp, ha n'eo ket sklaved. Ber c'hiriegezh a zo ivez hon teñzor dirak Doue. N'hon eus ket da varn kennebeut ar re a gemer un hent disheñvel. Met, war an hent hon eus kemeret, a-wechoù hini ar stourm kalet, dañjerus, an dispac'h pe ar brezel, dal - c'homp soñj eo ar bed-mañ ur bed a bec'hed, na c'hell nemet Doue e salviñ, ha salvet eo endeo en un doare, rak trec'het en deus Jezuz war ar marv, dre e Groaz, ha dasorc'het eo bet. N'eus digarez ebet kennebeut da chom er-maez eus an dachenn-stourm. Setu aze drama ar vuhez kristen. Setu aze hec'h uhelled, hag he leunder. Hor Salver en deus diskouezet dimp n'eo ket c'hoari a zo da ober ma venner mont d'e heul. N'eus nemet ar groaz e penn an hent. Ar c'hristen ne c'hoari ket gant ar bed. En hor buhez a emsaver e Breizh e kavomp skoilhoù bemdez. Techet e vezer da gas pep tra da get. Techet e vezer d'an droukrañs. Hogen, komzoù kreñv an Aotrou Doue a zo aze evit mirout na blegfemp ket dirak an idolennoù. An douster en hor c'halon a ro dimp un arm a efadusted kristen, zoken e-kerz ar brezel hag an dispac'h. Soñjomp er re a zo en



toullbac'h en Esukadi, e Brazil, ar re a vez mac'hagnet e Bro-C'hres. Soñjomp er re a zo bet toullbac'h et evit bezañ difennet Breizh, re re a boagn evit dieubiñ o bro hag a rank ober brezel evit se.

4° EURUS AR RE O DEUS NAON HA SEC'HED A JUSTIS RAK INT A VO ROET O  
GWALC'H DEZHO

Klotañ a ra an eürusted-mañ gant hini an dud a beoc'h. Studiomp a-  
nezh a-gevret eta. Petra eo ober ar peoc'h ? Diazezañ un urzh reizh.  
Reiñ da bep hini e wir. Reiñ o gwalc'h d'ar re a vank un dra bennak  
dezh. N'eus peoc'h gwirion ebet na ve ket diazezet war ar reizhded hag  
ar wirionez. Ar Justis-se, ar yun-se eo a blij da Zoue evel m'hel la-  
var ar Profed Izaias:

"Ha n'eo ket hemañ kentoc'h ar yun a blij din :

Distagañ chadennoù an drougiezh,

Diskoulmañ liammoù ar yev,

Lezel ar re wasket da vont en o frankiz;

Terrifñ pep yev ?

Rannañ da vara gant an hini en deus naon,

Degemer ez ti ar beorion hep ti nag aoz,

Gwiskañ ar re a welez en noazh,

Diwall d'en em zistreiñ diouzh an hini a zo da gorf da-unan.

Neuze e tarzho da sklerijenn evel ur goulou-deiz,

Ha da c'houlloù a bareo dizale,

Da reizhed a gerzho ez raok,

Ha splannder an Aotroù a vezo war da lerc'h.

Ma rannez da vara gant ar marnaonieg,

Ha ma roez e walc'h d'an ene glac'haret,

Neuze e savo da sklerijenn en deñvalijenn

Hag e vezo da deñvalijenn evel ar c'hreisteiz." Is.58,1-10

Ma sellomp ouzh an darvoudoù politikel a-hed an istor, e welomp n'eus  
bet nemet brezelioù, hag emglevioù n'o deus morse padet pell. Perak  
kement-se ? Da gentañ dre m'eo hor bed ur bed a bec'hed, gwir eo, met  
ouzhpenn-se dre ma vez klasket diazezañ ar peoc'h war ar gaou, war nerzh  
an armoù, war drec'h an hini kreñvañ, war interest an hini pinvidikañ  
a wask ar re wanañ. Heñvel dra etre ar pobloù hag etre an dud prevez.  
Kement-se n'eo nemet fals-peoc'h. Rankout a reer e ziskar evit klask di-  
azezañ ur peoc'h gwirion a roio e wirioù da bep hini. Mar sellomp ouzh

nor bro-ni e welomp direizhderioù e pep lec'h, e welomp ur seurt peoc'h  
n'eo ket unan gwirion, diazezet ma 'z eo war an touellerezh. Hon dever,  
hor c'halvidigezh, eo lakaat ar justis da ren, ret eo kaout naon ha se-  
c'hed eus ar justis-se evit hor bro hag an holl vroioù gwasket. An em-  
zalc'h-se hon eus da virout dibleg a-hed hor buhez. O reiñ frankiz d'hor  
bro, o reiñ dezhi he sevenadurezh, o tifenn ar bobl, o reiñ labour d'ar  
re youank, goanag d'an dud, kalon da labourat, e reer bolontez an Aotroù  
Doue hag e lakalomp ar peoc'h gwirion da ren. Marteze e vezo ret diskar  
dre nerzh ar fals-peoc'h a zo bremañ, evit diazezañ unan gwirion. Lava-  
ret em eus e sell kement-se ouzh hor c'houstoniañs. Ar C'hrist ne zibab  
ket en hol lec'h. N'omp ket galvet d'ur vuhez aes ha diriskl. An Iliz  
n'he deus sklerijenn ebet war an hentennoù a rankomp kavout evit lakaat  
da dalvezout hor palioù broadel. An Iliz n'he deus sklerijenn ispisial  
ebet war an diskoulmoù politikel. Ar pezh a lavar dimp avat eo hon eus  
dalc'hmat da glask ober ar peoc'h, hervez an degouezhioù. Hag ar peoc'h-  
se a c'hell tremen dre ar reuz hag an dispac'h. Bewech e vez ret studiañ  
pizh, gant ar brasañ evezh, ar pezh a zo gwelloc'h d'ober. Un dra a zo  
sur avat: ne c'hellimp ket ober un dra reizh eus un dra a zo fall. Ar  
brezel, ar gasoni, an drouknerzh a zo diruzhioù ha pec'hed. An direizh-  
der a c'houzañver, ar gwaskerezh, a zo pec'hed ivez. Ne c'heller ket a-  
santiñ muioc'h d'ur pec'hed eget d'unan all. Da zibab hon eus etre dir-  
urzhoù disheñvel. Dimp-ni da zibab, gant an douster en hor c'halon, dalc'h  
mat evit diazezañ ur peoc'h gwirion, ha n'eo ket evit ar blijadur da ober  
reuz. Re c'hrevus eo an obererezh-se. N'eus ket da goll amzer avat. N'eus  
ket da gilañ, evel tud aonik, pa 'z omp bugale d'an Hini a zo trec'h d'ar  
marv. Evel ma lavar Paol VI, an traoù direizh er bed a-bezh a zle bezañ  
stourmet kalet outo, dre gemadennoù bras ha kalonek. Nag ar C'hrist hag  
an Iliz ne lavront dimp pelec'h emañ an diskoulm evit Breizh, nag en  
dieubidigezh klok, nag en emrenerzh, nag er rannvroelerezh. Dimp-ni da  
glask. N'omp ket sklaved, met tud, kiriek ha dieub. An holl Vrezhoned a  
zo breudeur, hag hor c'harantez a ya dezho-holl. Davet ar re a stourm  
enep d'hor bro ivez ez a hor c'harantez, rak n'eus plas ebet evit ar ga-  
soni en ur galon kristen. Hon dever avat a zo sklerijennañ koustiañs ar  
re a wask war hor mammvro. N'omp ket tud a zizunvaniezh, met tud a unva-  
niezh hag a emglev, peogwir ez omp galvet da vezañ unan en un Iliz unan,  
evel an Doue unan e karantez an Tri Ferson. Peogwir ez omp izili eus an

EISTEDDFOD 1967

Y BALA



Rener Y Faner, e bried, D. J. Williams  
ha Kate Roberts

DIELLOU  
Documents.

STAGADENN DA SKOL, niv.45  
Supplément à SKOL, N° 45

L'engagement dans "la question bretonne" est une obligation évangélique de charité chrétienne. Intervention au cours d'une journée d'études sur le thème suivant :

L'EGLISE DE BRETAGNE PAR RAPPORT A LA QUESTION SOCIALE,  
A LA LUTTE DES CLASSES ET A LA LUTTE DE LIBERATION NATIONALE

P BOURDELLEZ

I

Il ne s'agit pas de théories; il s'agit d'hommes à sauver. Or si nous jugeons l'arbre à ses fruits, il est évident que la sujétion de l'Eglise de Bretagne, depuis la guerre, au Capitalisme Centralisateur français, a eu pour elle (et toute la Bretagne) des conséquences mortelles, dans son corps et dans son âme.

1° DANS SON CORPS.

Si, dans un pays autre que la Bretagne, un gouvernement athée avait ruiné autant de chapelles et d'églises qu'il s'en est effondré en Bretagne depuis 20 ans - fermé des séminaires et des noviciats, ou réduit le recrutement à des chiffres dérisoires - chassé progressivement les prêtres des paroisses, et les religieuses des hôpitaux - vendu les statues des saints - interdit à l'Eglise de s'occuper de la question sociale, et tout spécialement de propager "Populorum Progressio" - déporté la population active pour la loger dans les taudis, l'employer dans des emplois inférieurs, - forcer la région à fournir de 40 à 60 % des prostituées nationales" - brisé les vœux par l'école, la caserne et l'alcool - mâté les révoltes, des paysans par la police, en laissant, en un seul lieu et un seul jour, 300 blessés sur le terrain (Quimper, oct. 1967)... l'indignation serait vive et combien justifiée !

Or c'est exactement ce qui se passe en Bretagne depuis la guerre.

2° DANS SON AME.

Seulement le Capitalisme Centralisateur français s'y est pris très adroitement : il a miné l'âme, il a enlevé au Sel sa saveur. De temps en temps quelques déclarations (ex. la déclaration de l'Evêque de Quimper devant le général de Gaulle) prouvent que l'Eglise de Bretagne n'a pas la conscience en Paix. Comment le serait-elle ?

Le Christ a dit : "Tu aimeras !", et depuis la guerre nous n'osons plus aimer les Bretons. - "Tu t'incarneras !", et nous n'osons plus être Bretons avec les Bretons. - "Tu évangéliseras les pauvres !" et ce sont les plus pauvres qui sont les plus dépaysés dans nos églises. - "Tu seras mon témoin", et nous doutons de l'Evangile, ou bien nous semblons l'ignorer. - "Tu souffriras et tu mourras pour les sauver... Tu seras traîné devant les préfets et les juges!" et il nous arrive d'être décorés ! - Tu leur donneras la vie, la vie abondante, le pain, les vêtements... Tu les visiteras dans leurs maladies et leurs prisons... Tu seras messager de vie et

de Résurrection !", et nous propageons des théories naïves et fausses pour "prouver" que les Bretons doivent mourir et la Bretagne mourir !

Et nous voyons avec terreur se réaliser la menace implacable :

"SI LE SEL PERD SA SAVEUR,  
IL N'EST PLUS BON QU'À ÊTRE JETÉ DEHORS POUR ÊTRE FOULÉ AUX PIEDS".

Cet abandon est d'autant plus inexplicable qu'à la fin de la guerre l'Eglise de Bretagne disposait de moyens d'apostolat comme elle n'en avait pas eu depuis longtemps : les séminaires et les noviciats se recrutèrent abondamment - les écoles libres avaient vu le nombre de leurs élèves monter en flèche - les écoles secondaires l'emportaient sur celles de l'Etat, et pouvaient former des hommes capables de rendre sa prospérité au pays juste à l'époque où "la richesse émigre vers la mer" - les paroisses avaient des prêtres, des frères, des religieuses, nombreux et jeunes - l'Action Catholique disposait surtout de ses milliers de jeunes J.A.C., en particulier la magnifique jeunesse formée par le chan. Favé - D'ailleurs, les catholiques accédaient au pouvoir en France avec le M.R.P. et le Gén. de Gaulle... ce qui ne s'était pas vu depuis 3/4 de siècle. - L'Abbé Perrot, l'Abbé Lec'hvien, Ar Yeodet, et d'autres, avaient donné le témoignage de leur sang. - Quand une rafle monstre de prêtres fut opérée dans le Léon, la région se souleva. - Le Bleu-Brug de Saint-Pol dépassa en splendeur et en ferveur tout ce qui s'était vu jusque là. - Landévennec fut reconstruit. - La moitié des missionnaires "en Mission" étant bretons, la Bretagne à elle-seule soutenait l'aile marchante de l'Eglise universelle.

C'est alors que l'Eglise de Bretagne s'est assoupie: sa lampe s'est éteinte, son foyer s'est éteint, les pauvres sont partis. Nous cherchons les braises sous les cendres, car vers qui irions-nous ? Elle a les paroles de la Vie... Au nom de Saint Yves, que ces paroles se fassent chair, esprit et Vie !

## II

Qui donc peut, en jugeant l'arbre à ses fruits, prétendre qu'il soit PLUS GRAVE de s'allier au marxisme qu'au capitalisme centralisateur ? Qui y a-t-il de plus grave pour un chrétien que d'accepter pour son prochain mort sans espérance ? Mais la Tchécoslovaquie, après d'autres pays, nous prouve que c'est aussi grave... Quel avantage y a-t-il à tomber de la marmite dans le feu, "ous ar billig en tan" ?

Nous avons, nous chrétiens, une doctrine sociale basée sur l'Evangile et adaptée à la situation actuelle du monde, et de la Bretagne en particulier, par l'encyclique "Populorum Progressio", dont le principal inspirateur fut le P. Lebreton, de Saint-Malo.

Le fidèle à l'Evangile, le chrétien ne peut accepter comme un idéal ni la Lutte de Classes, ni aucune lutte: l'idéal, c'est la justice et la paix. "Fructus Justitiae, Pax" (Le Fruit de la Justice, c'est la Paix). C'est seulement lorsqu'un gouvernement crée, impose une situation d'injustice et de violence qu'il perd le droit à la soumission, et que la lutte violente peut être un moyen de défense nécessaire, mais jamais un idéal. Diviser les Bretons et les dresser les uns contre les autres, c'est d'ailleurs ce que les formations politiques parisiennes ont toujours fait: diviser pour régner.

Le premier témoignage du chrétien, c'est de se faire "plus breton que les Bretons pour sauver les Bretons" (Massignon, professeur au Collège de France), d'être présent aux mouvements culturels, économiques, religi-

eux pour transformer la Bretagne de mort en une Bretagne de vie; d'être un révolutionnaire d'amour que la Police "fichera", que les faux révolutionnaires porteront sur leurs listes noires et tueront peut-être dans les chemins creux, ou les bois, ou la nuit.

2° Lorsque la lutte devient nécessaire, la Lutte des Classes risque d'être une perspective fautive dans le monde actuel. Les économistes et "Populorum Progressio" sont d'accord pour souligner que les déséquilibres sont de plus en plus des déséquilibres entre régions sous-développées et les régions sur-développées. En France, cela est flagrant et voulu ("Paris et le Désert Français" - "Réflexions pour 85" - Etudes sur l'économie "coloniale" de la Bretagne", pays en voie de sous-développement", P. Lebreton).

Le chrétien breton doit donc se garder de toute illusion sur la Lutte des Classes et sur la collaboration avec le capitalisme centralisateur. La libération sociale à laquelle il doit participer sous peine de renier le Christ et ses frères, est une lutte de libération régionale (au sens géographique) pour rendre aux habitants d'une presqu'île de l'Atlantique Nord, artificiellement réduite à l'état de désert, le droit de développer leur culture et de gagner leur vie et celle de leurs enfants. Celui qui n'a pas cette liberté essentielle, dit le Pape Paul VI, n'est pas pleinement un homme.

## EXPLOSION MARXISTE EN BRETAGNE ?

### I

Au mois de novembre, l'Abbé Giblat, chargé à St-Brieuc des relations avec les incroyants, ayant fait une enquête à Rennes dans le monde étudiant, déclarait dans une causerie à des élèves de Terminale:

"Nous assistons à une explosion d'athéisme... Il y a quelques années, les étudiants voulaient surtout faire des sciences, maintenant ils sont attirés par la sociologie et les sciences économiques. Ils souffrent du déracinement. AUCUNE REFERENCE A DIEU, AUCUNE REFERENCE A RIEN, SAUF LES MARXISTES. La nouvelle génération n'est pas optimiste. Il y a les hippies et la drogue. Il y a aussi ceux qui aspirent à une politique dure. Ou bien on "écrase", ou bien on s'engage follement dans des actions politiques.

Il faudra inventer une nouvelle façon d'être chrétien. L'Evangile est coupé de la vie. Qu'est-ce que le Christ ? La Charité ? L'engagement ? Le Mystère Pascal ?"

### II

LA CROIX, dans son N° du 17/12/69, publiait cet entrefilet: "A l'occasion de la Journée Nationale d'Action Lycéenne, organisée par les Comités Lycéens "Barricades", le "Secteur Lycéen du P.S.U." et "La Jeunesse Etudiante Chrétienne" (J.E.C.) des comités de Lutte" ont été constitués à Paris et en province. Les organisations ont participé au cours d'une conférence de presse, tenue au siège de l'UNEF, que ces comités se fédérèrent sur le plan régional".

### III

Le samedi 17 janvier, à Rennes, à la Paroisse Etudiante, se déroulait une journée d'études où se rencontraient des aumôniers et des religieuses chargés des étudiants, le F.L.B.II, le P.S.U. et des Cauchistes.

Les uns et les autres avaient envoyé des invitations, de sorte que se trouvaient là aussi le P. Cardonnel (auteur de "Dieu est mort en Jésus - Christ", deux Franciscains de la revue "Frères du Monde", Vigier (exclu du P.C. pour Guévarisme), Mazé de la revue bretonne "Emsav", nous, prêtres du Trégor, etc., en tout 25 personnes environ. Les prêtres avaient été spécialement invités, le sujet proposé étant "L'Eglise de Bretagne par rapport à la question sociale, la lutte des classes, et la lutte de libération nationale"...Ce titre avait d'ailleurs fait peur à quelques invités, paraît-il.

(Le lendemain, une autre journée d'études était organisée pour des dirigeants agricoles.)

Nous avions préparé nos interventions (cf. Texte précédent, p.33-35) sur le plan suivant:

1° S'il est malheureusement vrai que depuis la guerre l'Eglise de Bretagne a fait silence sur la doctrine sociale chrétienne, il est vrai aussi que c'est une attitude récente, en opposition avec l'Evangile et l'Histoire de l'Eglise, dont les résultats sont désastreux pour l'Eglise et la Bretagne elle-même.

2° Le malheur de la soumission passive au capitalisme ne justifie pas la collaboration avec le marxisme pour la lutte des classes. Il existe une doctrine sociale chrétienne, qui commande l'amour des pauvres et de la Bretagne, à laquelle l'Eglise de Bretagne avait été fidèle jusqu'à la guerre, et à laquelle il faut revenir.

Nous avons vu au cours de la journée les marxistes découvrir la Bretagne et sa force révolutionnaire, et d'autre part les nationalistes découvrir le marxisme et l'intérêt politique qu'il y avait à s'allier à ses formes non-communistes. Non pas, était-il précisé, "la philosophie marxiste", mais "son analyse scientifique de la société". En fait cette analyse semble bien être basée sur les deux principes essentiels de la philosophie marxiste :

1° Le matérialisme: le mot n'a pas été prononcé, mais il a fallu que l'un de nous insiste beaucoup pour faire admettre l'importance de la culture. (Ce qui semble indiquer un matérialisme très élémentaire d'ailleurs.)

2° La contradiction: le mot est revenu très souvent, toutes choses étant cataloguées en blanc ou noir, à la mode marxiste: amis ou ennemis.

Avec toutes les conséquences que le marxisme tire de ces principes:

1° La Lutte des Classes: il faut découvrir les anti-bretons, et les complices du Capitalisme et que toute la société se "reclasse" d'après ces critères. (Nous avons rappelé que les économistes et "Populorum Progressio" insistent sur les régions riches et les régions pauvres plutôt que les classes.

2° Détruire la société pyramidale, et refuser tout réformisme.

3° Construire une société fraternelle et entrer dans cette lutte à laquelle nous commençons à participer des prêtres et des évêques d'Amérique du Sud (Camille Torres, Don Heider Camara, les prêtres basques et catalans) qui seront l'Eglise Nouvelle.

Il semble maintenant évident, pour ceux qui ont connu l'action de l'Ab-

bé Perrot, de Guébriant et de tant d'autres, évêques, prêtres et laïques bretons, que le divorce entre l'Eglise et la Bretagne porte maintenant ses fruits.

Politiquement, le tournant a été pris en mai 68, quand le drapeau breton a flotté à la Sorbonne avec les drapeaux rouges et noirs. Jusque là, les vieux communistes calomniaient, battaient (et pendant la guerre tuaient) les suspects de nationalisme breton, car ils étaient des concurrents - cependant que les cultivateurs ignoraient la politique - et que l'Eglise de Bretagne s'alignait sur Paris et se désolidarisait des Bretons.

Aujourd'hui les nouveaux marxistes (gauchistes), les agriculteurs au bord du gouffre, les nationalistes, le "nouveau clergé", se cherchent, se trouvent s'allient pour la révolution. L'ignorance des prêtres par rapport au message évangélique, le dégoût des jeunes pour la société actuelle (suicide par le feu), la situation désastreuse de la Bretagne, le rapport Védal et les menaces qu'il fait peser sur les agriculteurs, la nullité des responsables, le silence de l'Eglise les poussent à conclure au plus vite cette alliance.

Mais comment est-il possible que personne ne parle plus de la doctrine sociale chrétienne, sur laquelle pourtant, chose inouïe, les Papes ont publié TROIS ENCYCLIQUES coup sur coup ? Que même les TROIS CENTS BLESSES de la journée de Quimper n'aient pas réussi à sortir les chrétiens de leur silence ?

#### IV

Les quotidiens régionaux du 21 janvier 1970 publiaient le programme de quatre journées d'études pour les Jeunes Agriculteurs du Finistère.

La journée du jeudi 2 février sera consacrée à l'analyse de la société. Le socialisme sera présenté par un Jeune Agriculteur (J. Bourhis), tandis que le capitalisme sera présenté par un responsable industriel ou commercial... ce qui semble indiquer dans quel sens vont les sympathies (dans la situation faite par le capitalisme à l'agriculture bretonne, il serait difficile qu'il en soit autrement). Mais de la doctrine sociale chrétienne, il n'est pas fait mention. Or ces jeunes Agriculteurs sortent certainement pour la plupart des écoles chrétiennes et de la J.A.C. ou M.R.J.C.

L'Eglise de Bretagne n'a-t-elle donc plus aucun souci d'être "le levain dans la pâte humaine" ?

EN CONCLUSION, ceci n'est qu'un essai pour comprendre. Gauchistes, F.L.B.I ou F.L.B.II, Prêtres de "l'Eglise Nouvelle", agriculteurs bretons, il est impossible de les condamner, il est tout aussi impossible de les suivre sans garder les yeux fixés sur la Croix du Christ.

Il est évident pour les plus aveugles que nous avons connu deux Eglises successives en Bretagne.

La première aimait les Bretons et les Bretons l'aimaient. Elle a péni pendant des siècles et à travers les révolutions, aimée et sauvée les Bretons. A la fin de la guerre, elle était plus vivante que jamais.

Celle qui l'a supplantée n'aime pas les Bretons et les Bretons se sont très vite écartés d'elle : au bout de 25 ans elle meurt de n'avoir pas su aimer. J'ai vu une chrétienne, pauvre, vieille et admirable, agoniser au bord du désespoir parce que "l'Eglise avait abandonné les Bretons"



(An Iliz he deus dilezet ar Vretoned).

Dans une école, un film a été projeté à des jeunes filles sur l'alcoolisme et le cancer. À la vue de la carte de France avec les pourcentages régionaux en teintes plus ou moins foncées et de la Bretagne toute noire, "toutes les filles chialaient". Par respect pour le Christ, je N'OSE PAR DIRE quelles ont été les réactions, dans des cas récents, de personnages importants de la Bretagne... Hélas ! la déchristianisation de la Bretagne est très facile à expliquer !

Mais pour rejoindre "l'Eglise Nouvelle", il faut que nous soyons sûrs qu'elle aime les Bretons, que son programme soit L'INCARNATION, de Temoinage de REDEMPTION et de RESURRECTION.

Et pour que nous suivions nationalistes, cultivateurs, gauchistes et très "nouveaux" dans la Révolution, qu'ils admettent que les chrétiens ne se battent pas CONTRE, que nous ne pouvons donner notre action et notre souffrance que POUR DEFENDRE LES BRETONS.

Qu'ils ne nous demandent pas de laisser la HAINE entrer dans nos coeurs: ce serait dresser entre eux et nous une impossibilité, malgré la sympathie qui nous porte vers eux.

P. Bourdellez, beleg.

#### PAROLES EPISCOPALES

##### LETTRE DE 15 EVEQUES DU TIERS-MONDE

"Les chrétiens et leurs pasteurs ont à coeur de rester dans le peuple, sur la terre qui est leur. L'histoire montre qu'il est rarement heureux à long terme qu'un peuple s'exile loin de sa terre et se réfugie ailleurs. Il doit ou bien défendre sa terre contre un étranger injuste agresseur ou accepter des changements de régime qui s'imposent dans son pays. C'est une faute pour les Chrétiens de se désolidariser de leur pays et de leur peuple à l'heure de l'épreuve, surtout si ces chrétiens sont riches et ne fuient en réalité que pour sauver leur richesse et leurs privilèges.

Certes une famille ou une personne peu être obligée d'émigrer pour chercher du travail conformément au droit de l'émigration (cf. Pacem in Terris). Mais des exodes massifs de chrétiens peuvent causer de regrettables situations. C'est sur leur terre, dans leur peuple, que les chrétiens sont normalement appelés par Dieu à réaliser leur vie en solidarité avec leurs frères de quelque religion qu'ils soient afin d'être parmi eux témoins de l'amour du Christ pour nous".

in "Lumière et Vie", N° 85, nov.-déc. 1967, p.93 et suiv.

##### DOM HELDER CAMARA

"Comment pourrions-nous favoriser la victoire de ceux qui, demain, feraient appel à toutes les ressources de la technique pour déraciner la foi de notre peuple ? Lorsque certains hommes doués de grandeur morale, tel Roger Garaudy, tentent de détacher le socialisme du matérialisme dialectique et se prononcent pour le pluralisme au sein du monde socialiste, ils sont sanctionnés et expulsés du Parti.

Une guerre de libération, qui éclaterait en réaction contre la violence du colonialisme interne, serait écrasée par une guerre impérialiste: les E.U.A. n'auraient pas un second Cuba et, en conséquence, l'URSS

- 38 -

interviendrait immédiatement.

LE SOUS-DEVELOPPEMENT MATERIEL ENTRAINE LE SOUS-DEVELOPPEMENT MORAL : CELUI QUI N'A PAS UNE VERITABLE RAISON DE VIVRE, QU POURRAIT-IL TROUVER UNE RAISON DE LUTTER ET DE MOURIR ?"

Interview à la revue argentine "Confirmado", in "La Croix", 6 janv. 1970

" LA MISERE EST UNE VIOLENCE, car elle tue comme la guerre la plus sanglante. En Amérique, il y a une violence installée qui est représentée par le colonialisme interne. Nous acceptons cette situation, mais maintenant nous sentons qu'il faut bouger.

Je comprends ceux qui sont pour la violence. Il n'y a pas pour l'Amérique latine de solution établie. Ce n'est ni le capitalisme, ni le communisme. Nous devons chercher dans la ligne de la socialisation une formule capable de créer des conditions humaines de vie.

Je suis ici pour faire comprendre aux pays riches que les grands problèmes du développement des pays arriérés ne pourront être résolus sans changement des structures des pays développés".

Conférence de Presse à Québec, in "La Croix", 20 janvier 1970

##### Mgr VALENTIA, BUENAVENTURA, COLOMBIE

"Nous ne devons pas rester indifférents devant les structures capitalistes qui condamnent la population de Colombie et d'Amérique latine à la plus terrible des frustrations et à l'injustice... Définitivement, je me déclare révolutionnaire et socialiste".

Interview au directeur du CENCOS, in "La Croix", 13 janvier 1970

##### Mgr JACQUOT, MARSEILLE

"Pour l'Eglise il n'y a aucun régime parfait, l'Eglise ne prend parti pour aucun parti, elle doit avoir le souci de condamner les excès de chaque régime et qu'il n'y a aucun régime miracle."

Jeudi 12 février 1970 sur Radio Monte-Carlo, in "La Croix", 16 fév. 70

##### Mgr FRANCIS BARBU, QUIMPER ET LEON

"Les espoirs des hommes, comme ils semblent manquer à beaucoup aujourd'hui de bases solides ! J'ai trop souvent, au cours de visites pastorales ou de conversations avec des militants engagés, j'ai trop souvent entendu revenir les mots d'inquiétude, d'insécurité, d'incertitude devant l'avenir, j'ai trop souvent perçu une note de découragement, voire de désespérance, dans de nombreux rapports qui constatent l'incessante hémorragie de nos campagnes bretonnes dont beaucoup de jeunes, parmi les plus dynamiques, se voient obligés de chercher au loin du travail, - mais j'ai eu aussi trop d'occasions d'admirer le courage d'un peuple résolument tourné vers l'avenir, sans rien renier des richesses de son passé: race, langue, traditions, culture, où il sait puiser une sagesse et un dynamisme faits d'audace et de fidélité, pour ne pas partager ses inquiétudes, ses aspirations, son attente..."

C'est pourquoi le chrétien souffre de la douleur du monde... de la guerre, de la faim... du sous-développement... de l'oppression qui refuse à l'homme de s'épanouir dans un monde fraternel.

- 39 -

Le chrétien en souffre, et il peut arriver, plus spécialement peut-être chez nous où, si le cœur est tendre, parfois la tête est dure et le réflexe prompt, qu'il en souffre jusqu'à crier sa détresse ou à l'exprimer par la colère; mais avant de juger ses actes, il faudrait jauger la souffrance de son cœur et la qualité de l'amour qui l'anime".

Extrait du sermon prononcé à la cathédrale de Quimper, le 2 février 1969, le jour de la visite du Gal de Gaulle.

#### L'EGLISE DE BAYONNE ET LA QUESTION BASQUE

Réuni à Mauléon les 22 et 23 décembre 1969, le Concile presbytéral du diocèse de Bayonne a pris des décisions importantes, dont celle de créer en son sein "un groupe de travail sur la question basque".

Pour la connaissance précise des faits, nous citons intégralement le passage qui concerne la question basque dans le supplément au "Bulletin Diocésain" du 28 janvier 1970:

Groupe de Travail sur la Question Basque.

"Le Texte a été lu à l'Assemblée puis a fait l'objet d'un vote sur chacune des trois questions posées:

1° Vote sur le principe ; Oui,32; Non,1; Blanc,2.

2° Vote sur l'objet du travail de ce groupe :

1) les incidences du particularisme basque sur la pastorale dans notre diocèse;

2) la solidarité avec les prêtres basques péninsulaires; une coopération existe au point de vue liturgique, mais la pastorale ne peut faire abstraction des problèmes sociaux, économiques et politiques, qui sont d'ailleurs étroitement imbriqués les uns dans les autres.

Oui, 27; Blanc,2; Non,1; AMENDEMENTS, 5, à savoir:

a) établir une liaison officielle entre le Conseil Presbytéral de Bayonne et celui des diocèses basques péninsulaires;

b) le groupe est habilité à modifier lui-même l'objet de son travail;

c) accueillir d'autres aspects et les confronter aux priorités définies par le Conseil Presbytéral;

d) suppression du 2°

3° Vote sur la composition du groupe (Camino responsable, Laxague, Delgue, Eppherre, Irola, Mendiburu, Pagola).

Oui,29; Non,3; Blanc,2; amendement,1, à savoir:

Des béarnais - car il s'agit d'un même diocèse - des compétences neutres (sociologues, ethnologues !...) "

Cité par ENBATA, N° 159, 6 février 1970

COLLEGIATE FACULTY OF EDUCATION, ABERYSTWYTH - CRASH COURSE FOR ADULT LEARNERS OF WELSH - July 20th, August 1, 1970. The course will be directed by Mr Dan James, Research Lecturer in the Faculty, and it will be arranged at three levels. FEES: Residents, 27 pounds; non-residents, 6 p. 10 s.

- 40 -

Direct.- Gérant: A.Le Calvez, Crec'h-Avel, LANNION, 22

EISTEDDFOD 1969  
FFLINT



Gwynfor Evans ( an hini brasâ )  
J. E. Jones ( e-kreiz )  
hag ur mignon dezho

hevelep korf, an Iliz santel, a zo korf kevrinus ar C'hrist, hag ez omp maget ha buhezkaet gant an hevelep Sakramant, hini ar bara a vuhez, Korf Sakramantel ar C'hrist, a zo roet evit an holl da zilemel ar pec'hedoù. Hon deverioù a vez kontrol alies an eil d'egile. Na glaskomp ket kilañ, ha kavout digarezioù faes. Faziñ a reer pa stourmer. Enor ar c'hristen a zo gouzout ne c'hell ket kavout un hent all estreget ar Groaz.

#### 5° EURUS AR RE A ZO GLAN A GALON, RAK INT A WELO DOUE

Gwelet hon eus endeo ar geennadurezh a-zivout ar re a zo dous. An hevelep hini eo houmañ. Bezañ glan a galon n'eo ket bezañ un aelig. Bezañ glan a galon a zo bezañ un den e gwirionez, da lavarout eo bezañ an hini a nac'h ouzh kement tra a izela hag a vrein an den. Er bed a-vremañ e vez izelaet an dud, n'eo ket hepken dre an dispri, ar gwaskerezh, an naonegezh, an isdiorrador, met ivez dre ar sklavelezh. Sklavet e vezer gant ar bruderezh, an ekonomiezh-dispign, al loustoni, an dizoueelezh, ar geennadurezh dizenek a daper er skolioù. Sklavet, rak ne c'heller ken dibab, kemer hor buhez etre hon daouarn-ni hon-unan, hag e vezer sachet gant chadennoù ar gevredigezh dall. Breinet ar c'halonoù, dihenchet ar spredoù, mastaret ar c'horfoù. Pranet ha gwerzhet e vez pep tra. N'eus tra sakr ken. Gevier ha hudurniezh a bep seurt hag e pep lec'h. Hor galvidigezh a gristenien a zo lavarout nann. Nann d'ar sklavelezh-se. A-berzh ar C'hrist war ar groaz en deus graet ac'hanomp tud nevez, glanaet e dour ar vadeziant ha nerzhekaet gant eoul ar gouzoumenn, tud libr ez omp eta, hag ar grouadelezh ne zle ket bezañ lousaet gant ar pec'hedoù a c'hellomp argas. Penaos e c'hellefemp-ni karout an Doue santel-meur-bet mar bezomp leun a vreinadurezh en hon diabarzh ? Ul labour tenn, reut, pemdeziek, pennek, ez omp galvet da gas war-raok, evit sevel en-nomp-ni an den nevez-se, a gomz Sant Paol anezhañ, leun a c'hras hag a wirionez, kreñv en e emzalc'h, ha dous evit an holl.

#### 6° EURUS AR RE A ZO GWALLGASET EN ABEG D'AR REIZHDED, RAK DEZHO EO ROUANTELEZH AN NENVOU

Den ebet n'en deus c'hoant da vezañ gwallgaset, den ebet ne glask bezañ heskinet ha dismegañset. Hogen, alies e c'hoarvez kement-se, en desped dimp, pa glaskomp lakaat ar wirionez hag ar Reizhed e-lec'h ma tleont bezañ. Ar skouer kentañ eo hini ar C'hrist e-unan, lakaet d'ar marv dre ma tisklerie d'ar Farizianed ha d'ar skribed o fec'hedoù, o

diouer a garantez hag o filpousezh. An diouganerien o-unan a oa bet gwallgaset dre ma tamallent d'ar bobl adoriñ an idolennoù mut e-lec'h an Doue bev ha gwirion. Implijet e vez ar gaou, ar fals-testenioù evit barn ha kondaoniñ an dud reizh ha didamall. Jezus a zo bet kondannet e-gaou. Ar verzherien gristen a zo bet lakaet d'ar marv hag int direbech. Perak kement-se ? Dre ma n'asant ket kalon Mab-den e ve diskleriet dezhañ e bec'hedoù. Prest e vez da ober n'eus forzh petra evit lakaat da devel ar vouezh a zisklñ dezhañ e fallentez. En holl vroioù gwasket e vez toullbac'het gant ar galloud-sujer ar re a zifenn ar Bobl. Leun e vez ar prizonioù a doullbac'hidi a bep seurt, laiked, beleien, kristenien ha marksourien. Darn a gav nerzh o obererezh en o feiz kristen, darn all en o ideologiezh denel. Met an holl anezho a stourm evit ar Reizhed, hag abalamour da se e vezont anvet eürus gant Doue e-nan, ha Rouantelezh an Neñvoù a zo dezho, zoken d'ar re n'anavezont ket an Doue hollgarantezus. Rak ne vezomp ket barnet gant an Tad hollc'halloudek hervez ar pezh a anavezomp, met hervez ar garantez hor bo diskouezet en hon oberoù, hervez ar respont hor bo graet d'ar c'halvidigezh ispisial, ober kement tra a reomp en anv hor Salver Jezus-Krist; ha peogwir e anavezomp ar silvidigezh a zo deuet dre E varv hag E zasorc'hidigezh, hon eus da vezañ en holl zegouezhioù testoù eus ar C'helou-Mat-se, na c'hell ket an droug, an direizhed trec'hiñ war ar Mad, ar Reizhed. Eürus eta ar re a zo bet gwallgaset dre m'o deus difennet Breizh, eürus ar re a zo toullbac'het evit bezañ difennet gwirioù ar pobloù gwasket, evit bezañ nac'het sentif ouzh lezennoù hag urzhioù direizh; eürus ar re a zifenn ar re zu er Stadoù-Unanet, eürus ar re a glask herzel ouzh al lazhadegoù er Biafra hag er Viet-Nam. Eürus ar re o deus stourmet en Alamagn enep torfedoù an Nazied. Eürus ar re a stourm en Unaniezh Soviedel evit frankiz an den hag ar gevridigezh. Eürus ar re a zo e karch'ar en Euskadi; eürus ar re a zo prizoniet e Brazil; eürus ar re a laka o foan da reiñ buhez ha nerzh d'ar broioù isdioret. Eürus, muioc'h c'hoazh, ar re a vez heskinet abalamour d'ho fealded da Jezus-Krist ha d'e Iliz; heskinet e vezont e broioù 'zo gant tud dizoue, met heskinet e vezont ivez e broioù 'zo gant kristenien. Bemdez e kroazstager a-nevez hor Salver Jezus-Krist, bemdez e heskiner an dud reizh. Bemdez an hevelep sakrifis, bemdez an dasorc'hidigezh. Bemdez Sakrifis Santel an Oferenn. Bemdez e c'houlenn Doue diganimp kemm hor buhez ha dasorc'hiñ gantañ d'ar vuhez nevez. Komzoù Jezus-Krist a dalv evit ar re a gred hag ar re na gredont ket. Evel ur

c'hleze a ya betek mel an eskern evit hol lakaat da ober un dibab: pe a-du gant ar garantez, pe a-du gant an drougiesz. Mab Doue deuet den, marv ha dasorc'het, an Alpha hag an Omega, an derou hag an divezh eus Istor an denelezh, a zo evit an holl ar maen bolz hag ar maen-diazezh: Eñ eo a ro ur ster nevez, un dalvoudegezh nevez, ur gwirvoud nevez d'an holl oberoù, d'an holl zibaboù hiniennel. Peogwir eo deuet hor Salver en hon touez, eo deuet evidomp ur marevezh disheñvel diouzh al lezenn gozh: den ne c'hell nac'h dibab etre ar wirionez hag ar gaou. Hor Salver a c'halv pep hini ac'hanomp da vont d'e heul, da respont evela ar Werc'hez Vari: "Fiat mihi secundum verbum tuum". Eñ eo an Hent, ar Wirionez, hag ar Vuhez. Ar Gristenien o deus da heuliañ ar vouezh a glevont en Aviel prezeget gant an Iliz. Ar re all, ar vouezh a glevont en o c'houstiañs. Ar Reizhdéd eo a c'houlenn Doue diganimp. Kement-se a glot gant hor c'houstiañs. Eürus eta ar re a heuilh an hent-se, hag a vez gwallgaset en abeg da gelennadurezh Doue. Ur sin eo eus stourm an deñvalijenn enep ar sklerijenn. Eürus eta ar re o deus gwisket armoù ar sklerijenn, hobregon ar feiz hag ar garantez, tokarn esperañs ar silvidigezh: Rouantelezh an Neñvoù a zo dezho.

#### KLOZADUR

An Eizh Eürusted a dalvez evit pep hini ac'hanomp, hic et nunc. diouzhtu, e-lec'h ma vevomp; hol lakaat a reont da gompren petra eo bezañ e gwirionez un den a vev e natur-den en e leunder. An Eizh Eürusted n'int ket ur gelennadurezh politikel, na buhezegezhel, na kevredigezhel. Embann a reont eo krog ur marevezh nevez: hini Rouantelezh Doue. Abalamour da se e c'halv ar C'hrist an dud a volontez vat da gemm o buhez, da vezañ gantañ ha drezañ tud nevez, gant ur spered nevez, dindan nerzh ar Spered Santel. An Aotrou Doue a ra pep tra nevez. Heuliañ Kefoù-Mat an Eizh Eürusted a zo heuliañ skouer hor Salver Jezuz-Krist. Ur skouer kalet ha poanüs eo. Met n'eus ket uheloc'h skouer evit un den, peo gwir eo hini Mab Doue e-unan. Ar Feiz Kristen a ro tu d'an den da ziorren an holl c'halloudegezhioù a zo ennañ, hag a gas anezhañ, adalek bremañ, davet an eurvad peurbadel. Rouantelezh an Neñvoù a zo da sevel tamm-ha-tamma-hed an Istor. Kroget eo endeo, ha Doue a gas e bobl war-raok. Fiziet eo bet ennomp al labour-sevel-se. Doue a anavez e vugale

ha doujañ a ra d'e Grouadelezh. Hol lezel a ra dieub da zivizout petra ober, war dachenoù ar politikerezh, ar gevredigezh, ar skiantoù, an arzoù, ar sevenadurezhioù, evit kas da vat al labour-se, en deus ur plas a dalvoudegezh en ekonomiezh ar silvidigezh. Al labour-se avat, Jezuz a zo deuet da ziskuliañ dimp ne c'hell ket bezañ graet hep aberzh, hep ar Silvidigezh. An hent a gas davet an dreististor peurbadel eo hini an Eizh Eürusted; Eürus ar re a glev Komzoù Doue hag o laka da dalvezout.

Yann TALBOT (Crec'h-Avel, 28 a viz kerzu 1969)

Tennet eus ul lizher skrivet gant Y. Talbot d'an Ao. Kalvez :

"Marteze e kavot un tamm uhel ha difetis darn eus ar menozioù. Met ne welan ket pensos e vije tu da ober a-hend-all pa glasker sklerijennañ hon obererezh kristen (ar pezh a sell ouzh ar moral naturel ha kristen) gant misterioù an Feiz, misterioù ar C'hrist Dasprener. Gwirionezioù ar Feiz a zo dreistnaturel, da lavarout eo e tigoront ur ledigezh nevez, doueel, war ar gwirvoud danvezel ha denel. D'am meno, e rankomp, ni Kristenien an Emsav, diskouez n'omp ket war-lerc'h ar re all evit ar pezh a sell ouzh komprenusted ar bed a-vremañ.

Ul lodenn vat eus an Emsav (Tud Saded hag Emsav) a zo levezonet gant Hegel ha Heidegger (se a zo anat; goulennit digant F.K.): pouezañ a reont war an Istor hag an Hanez. Da lavarout eo an Den (dasein) mestr war e Hanez, o vevañ war ar c'hroazhent etre an Istor hag an Hanez (kv. en alamaneg an diforc'h etre Historie ha Geschichte). Kement-se am eus klasket displegañ ivez em skrid dre visterioù ar Feiz : ar Grouadelezh er penn, kentañ, Enkorfadur ha Dasorc'hidigezh ar C'hrist a ro d'an den an tu da vezañ mestr war an araokaat gant ma asanto kenlabourat gant Doue da savigezh ar Rouantelezh, hag an divezh dreiststorel eus an Hanez, a vo Rouantelezh Doue, e-lec'h ma teuimp da gener perzh hollek e buhez an Dreinded Santel peogwir dre ar Verb deuet den ez omp galvet ni ivez, tud, da vezañ kenlodek e hanvoud an douezelezh. (kv. Sant Athanas Aleksandria, "De Incarnatione Verbi", § 54)!"

Yann TALBOT (Angers, 12 a viz genver 1970)



NOTENNOU RETRED  
P. BOURDELLEZ

Me ivez am eus graet ur retred gant skoazell ar gelennadurezh don ha kaer-roet dimp gant hor mignon yaouank Yann Talbot. Ha setu amañ, war be-tra, a-drugarez dezhañ ha gant sklerijenn ar Spered Santel, en deus pre-deriet va c'halon.

Notenn gentañ : EURUS

A-bell 'zo, em eus bet klasket daoust petra a dalv evit Hor Salver ar ger "eürus" (gwenvidik), hag ar ger "gwalleürus": "Eürus ar re baour... gwalleürus ar re binvidik". Setu ar pezh a soñjan: "Evit kompren ezhomm-silvidigezh an dud, diouzh un tu, ha petra eo Rouantelezh Doue, diouzh an tu all (rak-se eta, evit uhelaat buhez ma-den betek dezhañ bout gwir vugel Doue ha tañva levez Doue) eo ret da bep hini distagañ e galon di-ouzh madoù an douar; gouelañ diwar e boan e-unan pe dre druvez ouzh ar re all; gouzañv dismegañs abalamour da Jezuz; bezañ glan a galon; klask ar Reizh ha karout ar peoc'h.

Gwalleürus ar re binvidik, rak ar re binvidik (a arc'hant, a zeskadurezh, a c'halloud) a vez dall ha diseblant, ne welont ket ezhommoù an dud ! A-naout a ran un itron, hag hi pinvidik, desket-bras; he fried a zo maer, n'int ket lorc'hus, daremprediñ a reont an iliz, penn-da-benn patrom ur "gristenez vat", skrivet ganti zoken buhez un den santel...met n'eo ket evit gwelout pebezh ezhomm o deus, an dud kaezh a zo en-dro dezhi, da vezañ salvet ! Hi, hep gouzout dezhi, he deus roet din da gompren ez eo "diaesoc'h d'ar binvidien mont e Rouantelezh Doue eget d'ur marc'h tremen dre doull an nadoz". Pennaos e vefent salverien peogwir, nemet digoret e vefe o spered ha teneraet o c'halon gant Doue, n'int ket zoken evit gwel-out o deus ezhomm an dud a silvidigezh ! Gwelit pegen dall ha digompren eo ar C'hallegerien gant o galleg ! Mac'homerien faeus hag a laka ar vre-zhonegerien er-maez, zoken eus an ilizoù savet gant hon tadoù ! ar re binvidik (a arc'hant, a zeskadurezh, a c'halloud) a vez dre natur "kolo-malourien", zoken pa vezont beleien, leaned pe leanezed, pe eskibien.

Unan gozh all a anavan, nepell diouzh ti an itron,kenoad dezhi; hag hi paour a-viskoazh, set da c'honit da seizh vloaz, bet diwezhatoc'h c'hwech vloaz e Pariz en ul labouradeg, hep gallout na deskiñ galleg, na deskiñ lenn. He gwaz, ur c'hristen mat a zen, en doa pignet ul levrig "Kroaz-Doue", evel ma veze lavaret, da zeskñ dezhi he lizherennoù. Met ken sku-izh e veze an eil hag egile goude an devezh-labour ma n'o deus biskoazh digoret al levrig: ganin emañ bremañ. Ma vije goulennet diganin va soñj diwar-benn homañ, n'eo ket ar ger "eürus" a vijen douget da zibab. Lava-rout a rajen ez eo eus ur OUenn-dud uheloc'h, kizidikoc'h, hag a wel do-noc'h hag uheloc'h war-un-dro e kalon hag e natur an den; hag ivez diaze-zet startoc'h, barrek da dreuziñ gwall-amzerioù ar bed-mañ, hep daouben-niñ. Madelezh, furnez, douster ha nerzh... ha brezhoneg mat ! ha devosi-on evit hor Salver hag e Vamm santel. Holl e parent en he daoulagad hag e sonont flour en he g'homzoù. "Eürus", eme hon Salver.

- 22 -

EIL NOTENN : AR GOELL N'EO KET UN DORZH-VARA

Reizh mat e lavar hor prezeger yaouank n'eo ar Feiz Kristen nag UR ge-lennadurezh politikel, nag UR gelennadurezh a vuhezgezh, na kennebeut UR gelennadurezh war ar gevredigezh; nag UR sevenadurezh, nag UR brede-rouriezh, nag UR relijion. Met evit bezañ reizh ha salvus, e rank pep hini anezhe asantiñ da gemer ar Feiz da wrixienn, da c'hoell ha da bal.

1 - Rak, sur mat, kelennadurezh politikel a zo an Aviel ! Pennaos en dije,anez, savet Sant Augustin e levr: "DE CIVITATE DEI" ? ha Bossuet e "BOLLITIKEREZH HERVEZ AR SKRITUR SAKR" ?

Netra nemet lavarout n'eo ket ar Stad doue a zo politikerezh. Ar Stad a zo doue evit an darn vuiañ eus an dud : ar Romaned, Egiptiz, Sinaiz, Japaniz...ha Republik ar C'hallaoued, daoust ha n'hon eus ket gwelet sa-krifiañ kristenien ha beleien dezhi ? Daoust ha ne lavare ket G.Thibon, o komz eus iliz Bro-C'hall, hag eñ kristen ha gall koulskoude, "pa soñj dezhi e vez o tiskouez dremm Hor Salver, ne ziskouez lies a wach nemet maskl Kaezar" ? Daoust ha n'eo ketebet nac'het ar Gommunion ouzh ur c'hristen mat e Breizh, e-tal gwele e wreg klañv-fall, da ma oa brogarour ? Sant Augustin, pedit evidomp !

2 - Buhezgezh a zo ivez en Aviel, ha gwir C'HOUREC'HEMENNNOU. Da gentañ, ar gourc'hemennoù kozh n'int ket bet diskaret gant Hor Salver: "n'on ket deuet evit diskar, met evit peurwellaat"; "da dad, da vamm a enori", a chom ken groñs ha biskoazh ! Ha ma 'z eus bet lavaret d'ar re gozh: "Na lazh ket !" Jezuz a lavar: "Na 'z pezo ket a gasoni !"

Petra da soñjal neuze eus ar Gourc'hemenn nevez : KAROUT ? Daoust hag a-walc'h eo drezañ e-unan, "ama, et fac quod vis" (Kar, ha gra hervez da youl) ?

Soñjal da gentañ, eo ur gourc'hemenn, ur gourc'hemenn ken groñs hag ar re gozh ! KAR ! Mevelien Bro-C'hall a soñj dezhe e karomp Breizh evel ma "kar" un dastumer-timbroù e dammouigoù paper. An Ao.Perron hag ar vershe-rien all o defe roet o buhez dre faltazi ha froudenn. N'o deus ket ! Bet e oant galvet gant Doue da GAROUT betek mervel. Breizhiiz ha na garant ket Breizh N'INT KET GWIR CRISTENIEN, ha n'hellont ket bezañ.

Soñjal goude, e van dalc'hmat e pep buhez ur c'hogn kuzh ne 'z a emañ na dour na tan ar Spered Santel. Lodenn pe lodenn ac'hanomp a chom din-dan al Lezenn Gohz,siwazh ! Eno n'hellomp ket ober"hervez hor youl" peogwir n'eo ket ur youl a garantez. Hogen gwelloc'h eo al Lezenn Gohz eget netra; gwelloc'h sentiñ eget ober droug.

"Nemet karet en defe bet ur plac'h, n'hell ket an den kompren petra eo kaout gwir karantez evit Doue", a lavare un den santel muzulman; ha pa lenner buhez sent a zo, evel Sant Erwan, e weler o deus bet gwir "amou-rousted" evit Jezuz hag ar berien.

Gras dimp da vezañ gwir "amourouzien Jezuz ha Breizh". Ar seurt tud-se a zo dreist al LEZENN ("pro hujusmodi non est lex"). "Lezenn an Hen" (Bo-de de la Route) kennebeut n'eo ket graet evit an Aeled.

TREDE NOTENN : KELENNADUREZH WAR AR GEVREDIGEZH

War ar gevredigezh kerkoulz all ez eus kelennadurezh en Aviel: "N'eo ket ar re a zo yac'h o deus ezhomm eus ar medesin". Ar re baour, ar re glañv, ar maouezed a wall-vuhez, al laeron, hag all, eo ar re emañ preder Hor

- 23 -

Salver gante. Ar re all n'int degemeret nemet ma teuent da sikour Hor Salver da salvin ar reuzeudien. "Lezit ho micher ha deuit ganin; gwerzh-it ho peadra, ha deuit ganin". Pa lennan an istor, e kavan lavarou evel hengant ar gristenien : "L'émminente dignité des pauvres dans l'Eglise"; nos Seigneurs les Pauvres". Mar deo an dudigoù kaezh hor gwir Aotrounez, ma tle ar gevredigezh kristen (an Iliz), pep gouarnamant kristen, bezañ e servij an dudigoù reuzeudik, ar pedenneù en ilizoù dibabet evito; al lezennoù er vro graet evito; ma tle an Aotrou a-benn bezañ kristen lakaat ezhommoù e servijer a-raok e ezhommoù e-unan, Salver benniget ! nag emañ pell Yann diouzh e gazez ! nag emañ pell war-lerc'h an Aviel !

Ha ne gavit-hu ket eo mall huchal an traoù-se war an tachennoù hag en ilizoù, e diskouarn hon deputeed hag hon eskibien, da zegas dezho soñj eus an Aviel ha "Populorum Progressio".

#### PEVARE NOTENN : SEVENADUREZH KRISTEN ?

Kalz a Kriz ez eus bet tabutet er bloavezhioù tremenet da lavarout ne oa ket a sevenadurezh kristen. Gwir eo n'eus ket UR sevenadurezh kristen. Met pep pobl a c'hell sevel he sevenadur kristen, gant tri diviz :

- e vo ur sevenadur yac'h hervez an onestiz,
- e klasko enoriñ Doue, ar Werc'hez hag ar Sent,
- e vo graet da gentañ evit ar bobl vunut, da lakaat kaerder en o buhez ha da sevel o c'halonoù d'an uhel.

#### PEMPVET NOTENN : AR FEIZ KRISTEN N'EO KET UR RELIJION

Daoust ma komzomp alies eus ar "Wir Relijion", Hor Salver n'eus ket degaset dimp UR relijion. Evel ma c'hell pep tra e buhez mab-den bezañ glanaet, pinvidikaet, unelaet dre an Aviel, pep relijion er bed a c'hell dont da vezañ "gwir relijion" ivez er giz-se.

Petra eo ur relijion ? Doareoù (lidoù, pedenneù...) ijinnet gant ur bobl evit azeuliñ he doue pe he doueed.

Ha petra eo hor relijion-ni da skouer ?

An tammoù talvoudusañ eus al Lezenn Gozh (ar gourc'hemenoù, ar salmoù, an istor santel...) mesket gant tammoù paganiezh (an ilizoù savet e-lec'h m'edo temploù; o gwerenn vras hag o aoter troet atrezek ar sav-heol; O Sol Oriens; ar feunteunioù sakr; ar peulvanoù aet da galvarioù; tantad heol berv an hañv aet da dantad Sant Yann; kef heol gwan ar goañv aet da gef Nedeleg; hag he sant patron pe he Gwerc'hez da bep kêriadenn evel 'm'he doa he doue pe he douez gwechall). Ken pagan omp ha mar doamp Yudev, d'an nebeutañ. Ha lidoù an Anson, c'hwi a gav deoc'h e teuent eus an Aviel ?

Ha koulskoude ez omp kristenien hag ez eo hor relijion UR gwir relijion. Perak 'ta, ha penaos ha war be ziviz ? Ma azeulomp dre al lidoù-se an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. N'eo ket avat o lavarout "Aotrou ! Aotrou !" en ur lufañ ouzh an oabl o c'hortoz Jezuz da ziflukañ... (Setu ar pezh a rae an Ebestel da Yaou an Asañsion, hag e teuas an Aeled da zegas da soñj edo war an douar-mañ al labour ouzh o gortoz !)

Aon am eus e vefe deuet an Aviel, evit kalz, danvez ha digarez da sevel un doare "Vaodou", da lavarout eo, dindan lidoù o tezevellañ an Aviel, e lakaent O relijion O-UNAN; met "Kelou-Mat" ar Silvidigezh da ve-

zan lakaet da dalvezout evit ar re baour, dilezet, faezhet, n'eo ken nemet moged ! Ur skouer: ar skolioù "kristen" o tistreiñ kalonoù ar vugala diouzh o bro hag o zud, rak setu GOURC'HEMENN DOUE AN ARC'HANT. Ur skouer all : an Ofereñnoù Yaouankiz, darn anezhe da vihanañ, ha ne vo komzet en-ne hag a baourentez, nag a binijenn, nag a silvidigezh, na zoken eus ar krifis Jezuz war an aoter rak doue an yaouankiz a zifenn. Ur skouer all c'hoazh: an "alleluia" kanet ken alies ha "Gloria Patri" er Gousperoù gant tud devot, hag i ken dall ha ma 's int devot, peegwir ne welont ket emañ pep tra o vervel en-dro dezhe ha ne fiiavont ket o bir bihan, rak doue Bro-C'hall ne bermet ket !

N'int ket kristenien, daoust m'emañ an Aviel en o beg... Vaodoued ! An Aviel n'eo ket ur goell silet en o faganiezh, ar pezh a zleje bezañ. N'eo evite nemet ur pentadur war o dremm.

Lavaromp, evit klozañ war gement-mañ, eo mat d'an DEN NEVEZ, GANET DIWAR AN DOUR HAG AN TAN E SKLERJENN AN AVIEL, sevel politikerezh, buhezegezh, kevredigezh, sevenadur, relijion, evit bezañ. N'hell ket ar bed chom en e sav a-hend-all ? Nemet e leer, dre garantez evit Doue hag an du kaezh, lakaat politikerezh hag all da dalvezout evit gloar Doue (n'eo ket hini ar Stad), hag evit salviñ a boan hag a bec'hed holl groudurien Doue, ha da gentañ "ar Paour, hor gwir Aotrou".

#### C'HWEC'HVET NOTENN : EURUS AR BAOUR, ADARRE !

Un dra all a zeu c'hoazh em spered war ar Baourentez. Peurliesañ ne soñjer nemet e pinvidigezh an arc'hant. Koulskoude er bed a-vremañ eo an deskadurezh brasoc'h ha suroc'h pinvidigezh; ganti e c'henezer zoken ar c'hant. Hag ur binvidigezh all a zo c'hoazh hag a zo dreist d'an div all: ar galloud.

Ret eo e vefent implijet, n'hell ket ur vro tremen hep ma vefe arc'hant, deskadurezh ha galloud etredouarn darn eus an dud. Arabat e vefe d'an holl gristenien mont da glaskerien-vara, na chom dizek, na nac'h kemer karg ar Stad. Ma rafent, piv a lakafe ar "madoù-se" e servij Doue hag an dud kaezh ?

Darn avat, o devez ur c'halvadenn ispisial digant Doue da vezañ paour, dizek, dic'halloud.

Evit ar re all, ez eo fall ha digristen lakaat da bal e buhez ar gonideg ezh, evel ma ra ar skolioù, na gelennot ar vugala nemet evit o c'has da Vro-C'hall da c'honit. Kement-se a zo nac'h an Aviel; kement-se a dalv kement ha lavarout : "Mat eo din salviñ va nesañ mar bezañ paet-mat". En Aviel avat e lennan : "Lez da vicher ha lez da vadoù !" hag e lizher Sant Paol : "Dister e fell din bezañ gant an dud dister evit salviñ an dud diater". Fall-put e vez, pa vez ar gristenien a-touez an rumad pinvidikaer. Ha desketañ. N'eo ket mat, pa vez pemzek tommeret-kreiz en ur c'hanton, e vefent holl e tiez ar re a zarempred an ilizoù. N'eo ket mat ne vefe nemet bourc'hizien ha tud desket o lenn ar penadoù Skritur Sakr en ofisoù.

H Hag ar re o deus karg eus madoù ar bed-mañ, arc'hant, deskadurezh, galloud; an hini a zo maer, kelennar, ijinour, depute, rener-skol, h.a... ar re-se hag a zo "distok o r... diouzh an douar", er bed a-vremañ; evit bezañ gwir gristenien, a-benn lakaat ar bed-mañ e servij an dud gwasket, eo ret dezhe bezañ gwir zispac'herien a silvidigezh, rak i eo jeneraled arme Jezuz hag ar Paour.

SEIZHNET NOTENN : AR PEC'HED A GASONI HAG AR PEC'HED A VREZEL

Ne gomprenan ket mat pa lennan ez eo ar gasoni nag ar brezel pec'hedoù. Pec'hedoù int, peogwir e reont droug d'an den hag emaint enep Youl an hini a zo KARANTEZ. Hogen, n'emaint ket da lakaat keñver-ouzh-keñver. Ar brezel (an naonegezh, gwaskerezh ar stadoù aleuberien, laoskentez an Iliz da salviñ ar bed, h.a.) a zo dreist-holl pec'hedoù ar gevredigezh. Daoust ma o deve ar renerien kont da rentañ anezhe, ne c'hell ket ar re-mañ ober pep tra mar chom diseblant an dud. Hon Eskibien hag hon Deputeed o devo kont da rentañ eus stad mantrus Breizh. Met ar re o deus o lezet da vorgousket o devo ivez. Hag ar re a ya enep dezhe, elec'h o skoazellañ da salviñ o eskopti... o devo ivez. Ha daoust hag e tle ar paotr yaouank kofez e vez bet soudard ha deskee gantañ lazhañ ? Daoust hag e tle an-me kofez ez eo fall-vaget an div drederenn eus an dud a zo war an douar ? Ar "pec'hedoù-se" n'int ket pec'hedoù un den; ar re-se, ha re all c'hoazh, eo pec'hedoù ar bed.

Ar gasoni, avat, a zo pec'hed un den, ha pep kasoni a zo torfed. "Karit zoken hoc'h enebourien". Zoken ar C'hallaoued ? Ya. Zoken ar Capitalourien ? Ya ! Met e-keit ha ma vezint oc'h ober gwall-reuz e Breizh ez eo va dever a garantez hag a justis o bountañ er-maez, ha herzel e pep doare ouzh an droug a reont. Peseurt karantez am eus evit an den paour ma lezan an Den Bras d'hen moustrañ ? Penaos e stourmin ouzh pec'hed ar bed ma plegan da vevel ar pec'hed ?

Gwir eo e c'hell ivez unan bennak bezañ galvet gant Doue da reiñ, penn-da-benn e vuhez, da testiñ a zouster hag a habaskted, evel ma 'z eus darn hag a vez galvet reiñ testiñ a baourentez. Mar deo un testiñ gwirion ha splann, ma c'houzañv an den "non-violent", kement hag ar stourmerien, n'hell den hen tamall. Ma n'eo nemet ur chuchuen chet evel ur c'had en he zoull, n'em eus fiziñs ebet en e "c'halvadenn".

Hag ar pezh a zo sur ha sur-mat, ar rener, an Eskob, an depute, ar mser, ar person... ha na gredont ket dilenn o zud, a zo anvet er Skritur Sakr "Chas ha n'int ket mat zoken da harzhal" !

PEDENN (da echuiñ ar retred)

O Spered Santel Doue ! c'hwi hag a zo kufv evel ar goulm ha kriz evel an tan;

O Salver Jezuz, c'hwi hag a voe ken karantek evit ar vugale, ar glañvourien, ar maouezed a vuhez fall - c'hwi hag a gasas daolioù-skourjez ar varc'hadourien e-maez an templ - c'hwi hag a chomas dibleg dirak ar pennoù bras, hag a drec'has war ar spont evit mervel war ar groaz;

O Sant Erwan, sant va bro ! c'hwi hag a roe d'ar paour ne poued, ho ti-lhad, ho kalon, c'hwi hag a zalc'he penn da "bersepterien" ar roue gall di-vergont;

O Aotrou Perrot, c'hwi hag a ganne er poull-kannañ lifse! mastaret ar c'hlasker-bara - c'hwi hag a sponte dirazoc'h mevelien Bre-C'hall ha re Bro-Rusia,

roit dimp nerzh da garout, da labourat, da bareañ, da zifenn da gomz ha da c'houzañv, ha da skeiñ pa vo ret,

EVIT SILVIDIGEZH AR RE A ZO ER BOAN PE ER PEC'HED.

UR BREZEGENN - EURED  
AN EURUSTED

Ma Breudeur ha ma C'hoarezed Kristen,

e-pad ma buhez em eus anavezet a bep seurt familhoù hag e meur a vro dis-heñvel.

Anavezet em eus familhoù eürus, ha siwazh ! anavezet em eus ivez familhoù gwalleürus, hag evidon-me, kollet gsin ma zad ha ma mamm pa oan yaouank c'hoazh, ez eo bet bep tro ur glac'har bras : evidon ur familh a oa graet evit bezañ eürus.

Anavezet em eus familhoù pinvidik eürus, ha familhoù pinvidik gwalleüruz; anavezet em eus familhoù paour eürus, ha familhoù paour gwalleürus; anavezet em eus familhoù gant tiadoù bugale hag a oa eürus, ha reoù all hag a oa gwalleürus; anavezet em eus familhoù hep bugale hag a oa eürus, ha reoù all hag a oa gwalleürus; anavezet em eus familhoù ane tud klañv hag a oa eürus, ha reoù all hag a oa gwalleürus.

Pelec'h eta emañ an eürusted mar n'emañ nag er binvidigezh, nag en un tiad bugale na zoken er yec'hed ?

Pa vo echu an ofis-mañ, ez efomp holl da ginnig hor gourc'hemennoù a eürusted d'ar priedoù nevez. Me a garfe gouzout petra a lakaomp dindan ar gerioù-se ? Pe daoust hag e chomont evidomp gerioù goullto da bep hini da lakaat dindane ar pezh a gar ?

Fañch hag Anne, ma mignoned ker,

c'hwi hepken moarvat a c'hellfe respont hirie ha displegañ dimp petra eo an eürusted evidoc'h.

Dimeurzh diwezhañ e oac'h deut hoc-taou d'am gwelout da Lannuon. Goulennet em boa diganeoc'h dibab e-barzh al leksional al lennadoù a blijfe deoc'h evit hoc'h oferenn-eured. Kemeret hoc'h eus al levrig etre ho taouarn, ha troet ar pajennoù, nec'het un tammig. Rentet hoc'h eus din al levrig en ur lavarout : dibabitc'hwi hoc'h-unan ar pezh a blij deoc'h, sur-mat e plijfont dimp hon-daou ivez.

Ha setu-me d'am zro tapet berr ha ken nec'het all. A-drugarez Doue mervet em boa daou dra dimeurzh diwezhañ.

Da gentañ, pegen eürus e oac'h hoc-taou o'n em garout an eil egile. Hoc'h eürusted a oa gvriziennet er garantez.

Ha d'an eil, pegement e fell deoc'h lodenniñ ho karantez gant ar re all. Pa 'm eus goulennet diganeoc'h ha distro e vefec'h eus ho peaj-eured a-benn Kamp Breuriez Sant Erwan e Bulad, ez oc'h chomet ur pennadig d'an em soñjal ha neuze hoc'h respontet: Ya ! ret e vo dimp bezañ e Bulad.

Setu perak em eus dibabet evel kentañ lennadenn, komzoù Sant Paol diwar-benn ar garantez etre ar priedoù; hag evel eil lennadenn, komzoù Hon Salver diwar-benn holen an douar ha sklerijenn ar bed.







daou lizher diwar-benn WANIG HA WENIG.

digant J.G. ar 27 a viz ebrel 1968

"Bet am eus ho paperenn diwar-benn Wanig ha Wenig ha kas a ran hiziv d'ar gelaouennig ur chekenn a 12 lur. Ret eo din anzav ouzhoc'h em beze kalz a boan o lakaat bugale ar skol da lenn ha da gompren yezh Wanig o vezañ ma oa e'hoazh re zizesk ma skolidi war ar brezhoneg. Ne oa nemet drek dre gant anezho a-gemant a veze komzet brezhoneg outo gant o zud.

Met allas ! bremañ eo serret ar skol vrezhonek, peogwir eo c'hwitet ar vugale da zont d'ar c'hentelioù. N'eo ket ar vugale o-unan eo a zo kiriek; o zud an hini a stourme. Evel ma ouzoc'h koulz ha me, ez eo deut arc'hiz er vro da gomz galleg ouzh ar vugale. Kablus da vat eo an dud vras. Ha koulskoude e vije bet aes dezho derc'hel ar yezh en he sav. N'on ket pet gwech em eus bet klevet reoù yaouank o tespetiñ dre ma ne oa ket bet desket ar brezhoneg dezho pa oant bihan.

Moarvat eo war vord ar mor ez aio ar brezhoneg da fall da gentañ. Ne welan nemet ur spi: ur bern tud yaouank war ar studi a gompren ar gaou a zo bet graet ouzh ar yezh hag a zo krog d'he deskiñ a-zevri ha meur a hini pa vezont dimezet a zesk brezhoneg d'o bugale.

Da c'hortoz, ne dalv ket ar boan kas Wanig din ken, ken na lavarinn deoc'h. Met derc'hel a rin bepred da gemer Skol ha Mouezh Sant Erwan".

digant Y.C. (skolaerez) lañ a viz c'hwevrer 1970

"E niverenn ziwezhañ Wanig ha Wenig e c'houlennec'h ali ar goumananterien diwar-benn ar gelaouennig plijus-se. Hiziv, evel an deiz kentañ ma zeuas er-maez ez on laouen o kas deoc'h va gourc'hemennoù kalonekañ. Graet aet diouzh doare ar re yaouank. An holl bennadoù, disheñvel an eil diouzh egi-le, dedennus, a zo barrek da stummañ al lennerien ha d'o sikour d'en em ampartaat war ar yezh.

Re nebeut anezho, siwazh ! a gemer perzh er poelladennoù goulennet, danavelloù hag all. Ar vistri-skol eo a zo kablus; ne gomprenont ket a-walc'h talvoudegezh ar yezh. Un dra diskiant e gwirionez.

Goulenn a rit hag-eñ eo ret treiñ e galleg gerioù pe droioù-lavar nebeut anavezet. Moarvat e vefe sikouret ar lenner yaouank da heuliañ gwelloc'h an istor, met n'eus forzh peseurt kelaouenn skeudennet he deus ezhomm evit bezañ komprenet mat eus skoazell ar mestr-skol pe eus hini an tad hag ar vamm; int hepken a c'hell displegañ ster an istor. Al labourioù all, lenn ha skrivañ a vez neuze frouezhus. Ha neuze e c'hell ar bugel lenn en e-unan e gelaouennig."

Directeur-Gérant: Armand LE CALVEZ, Crec'h-Avel, LANNUON, BRITTANY

Imprimeur: COPIE 22, PEDERNEC, 22

Diskleriet hervez lezenn: 2-4 trimiziad 1970

Dépôt légal

: 2-e trimestre 1970 N° CPPP: 35 323



AN AOTROU hag AN ITRON JEAN LE BOURDONNEC

Hanter-kant vloaz a labour hag a boan, a  
garantez hag a evurusted bevet asambles